

K A I E R O U

K E N V R E U R I E Z A R B R E Z O N E G

E S K O P T I K E M P E R H A L E O N

+++++

K A I E R N° 4Meurz 1970

Cahiers non périodiques. Souscription pour 500 pages: 10 ₣
 C.C.P. 193.17 Nantes, Chanoine Nédélec (Ker-Anna, 29 S Quimper)

+++++

TAOLENN AR PEVARE KAIER - Meurz 1970 -

Lodenn genta.- SKRITUR ZAKR EN OVERENN

<u>Pemped sul ar Horaiz</u> , bloavez B (1970)	1-4
d ^o - A	4-11
d ^o Orezonou an overenn	12

Sul ar Bleuniou, pe ar Basion :

1. pedennou ha lidou ar brosesion	13-16
2. Aviel an donedigez da Jeruzalem	17-18
3. Skritur Zakr en overenn	18-20
gand ar Basion hervez sant Mark	21-29

Sul Fask, Overenn an deiz 30-32

Orezonou an Overenn: da zul ar Bleuniou	33
da zul Fask	34

Eil Lodenn.- BADIZIANT AR VUGALE : Pedennou ha lidou.

+++++

Troidigeziou aotreet da arnod, evid an eskopti,
a-berz an Aotrou F. Barbu, Eskob Kemper ha Leon.

+ V. Fave, eskob-skoazeller.

PEMPED SUL AR HORAIZ

Lennadenn genta - An emgleo nevez etre Doue hag e bobl
a vo merket e diabarz ar halonou.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED JEREMIAZ (31/31-34)

31. Komz an Aotrou Doue eo: Setu deizioù o tond,
hag e rin eun emgleo nevez gand tiegez Israel ha gand famill Juda.
32. Ne denno ket d'an emgleo am eus bet grêt gand o zadou,
en deiz ma 'moa kroget en o dorn evid tenna anezo euz Bro-Ejipt;
an emgleo-se, roet ganin, ganto eo bet torret,
ha koulskoude e oan mestr warno.
33. En taol-mañ, setu peseurd emgleo a rin gand tiegez Israel
goude an deizioù a zo da dremen.
Komz an Aotrou eo:
Va lezenn a lakin en o hreiz hag a skrivin en o halonou;
Me 'vo o Doue, hag ind a vo va fobl.
34. N'o devo ket ezomm kén d'en em gelenn kenetrezo,
en eur lavared an eil d'egile: Deskit anaoud an Aotrou.
Rag pep hini am anavezo, euz an disterra beteg ar brasa.
Pardoni a rin an droug o deus grêt,
ha ne zalhin ket sonj euz o fehejou.

=====

SALM 50 / 3-4,12-13,14-15 - Ar "Miserere" ez eo; ar gwerzadou merket a cavit
er bajenn war-lerh. El levr Kantikou, e heller dibaba etre N^o 36, 37,
40 pe 41.

ALM 50 - Diskan: hini ar hantik n° 36 "Pehet am eus, ha kalz pehet:
Truez ouzin, Salver karet."
pe gwerzad 12: Krouit ennon, va Doue, eur galon hlan.

3. Truez ouzin, va Doue, ablamour d'ho madelez;
en ho trugarez vraz, lamit va mañkou en ho keñver.
4. Va gwalhit penn-da-benn euz an droug am eus grêt;
war-lerh va 'fehede, grit ahanon glan adarre.
12. Krouit ennon, va Doue, eur galon hlan,
lakit em hreiz eur volonteiz stard.
13. Mirit na dehfenn mui pell diouzoh,
ha na dennit ket diganin ho spered a zantelezh.
14. Rentit din ar joa da veza salvet ganeoh,
roit din kalon vad d'am harpa nerzuz.
15. D'ar re o deus grêt an droug e teskin pegen trugarezuz oh,
hag ar beherien a zistroio davedoh.

+++++

Eil lennadenn - Jezuz Krist sentuz ouz e Dad,

kaoz deom da veza salvet.

PENNAD EUZ AL LIZER D'AN HEBREED (5/7-)

7. Jezuz Krist, en deiziou ma veve er bed-mañ,
e-neus savet e bedenn virvidig warzu e Dad,
a oa en e halloud savetei anezañ euz ar maro;
hopet e-neus outañ a vouez kreñv, an dour en e zaoulagad,
ha selaouet eo bet ablamour d'e zoujañs vraz ouz Doue.

8. Evitañ da veza ar Mab, e-neus desket diwar e boaniou e-unan petra eo senti,
 9. hag, eur wech eet beteg penn, eo deut da veza evid kement hini a zerviche
 penn-kaoz d'ar

+++++

SALUD D'AN AVIEL - Diskan: Meuleudi deoh, Aotrou Krist!

Meuleudi deoh, Salver ar bed!

pe : Ho komz, va Doue, 'zo gwirionez,
 hag ho lezenn a dorr on liammou.

V/. An neb a zo servicher din, ra gerzo d'am heul;
 el leh ma vezin, e vo va zervicher ive.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN. (12/20-33)

20. Bez' e oa payaned e-touez an dud pignet da gêr Jeruzalem
 evid adori Doue da geñver gouel ar Pask.
 21. Dond a reont da gaoud Filip, hag a oa euz Betsaida Bro-Halilea,
 da houlenn digantañ: "Aotrou, ni 'garfe gweled Jezuz."
 22. Filip a ya da lavared da Andrev, hag o daou e lavaront da Jezuz.
 23. Jezuz a respont dezo: "Deut eo an eur ma tle Mab an dén reseo e hloar.
 24. E gwirionez, m'hénn lavar deoh, ar hreunenn winiz taolet en douar,
 ma ne varv ket, ne zoug netra;
 ma varv, avad, e tougo frouez e-leiz.
 25. An neb en em gar, a 'n em gollo;
 an neb e-neus kâs outañ e-unan er bed-mañ,
 a 'n em viro evid ar vuéz peurbaduz.
 26. An neb a zo servicher din, ra zeuio d'am heul,
 hag el leh ma vin-me, e vo va zervicher ive;
 kement hini a vo servicher din, a vo roet enor dezañ gand va Zad.

27. Ha bremañ, setu ez on strafuillet oll. Petra 'lavarin?
Tad, saveteit ahanon euz an eur-mañ!
Ha koulskoude, evid kement-se eo ez on deut beteg an eur-mañ.
Tad, roit gloar d'hoh ano!."
28. Dond a ra neuze eur vouez euz an neñv:
"Hag em eus roet gloar dezañ, ha c'hoaz e roin gloar."
29. Ar bern tud a oa eno o doa klevet trouz ar vouez,
hag e lavarent e oa bet eun tarz kurun;
med lod all a lavare: "Eun êl eo e-neus komzet outañ."
30. Jezuz a respont dezo: "N'eo ket evidon eo deut ar vouez-se,
med evidoh-hwi.
31. Bremañ ez a ar bed da veza kondaonet,
bremañ an hini a ra e vestr war ar bed-mañ a vo taolet er-mêz.
32. Ha me, pa vin bet savet diouz an douar, me 'zacho an oll davedon."
33. Kement-mañ a lavare evid rei da intent
peseurd maro e-noa da houzañv.

+++++

LENNADENNOU AR BLOAVEZ A a heller kemer ivez evid ar zulvez-mañ:

Lennadenn Ia - Doue a zo gouest da zigas buez en-dro
er re varo.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED EZEKIEL (37/12-14)

12. Evelhénn e kenz an Aotrou Doue: Setu e teuin da zigeri ho péziou
ha d'ho tenna euz ar béz, evid digas shanoh en-dro da vro Israel.
13. Gouzoud a reot ez on-me an Aotrou, pa zigorin ho péziou
hag ho tennin euz ar béz.
14. C'hweza 'rin va Spered ennoh, hag ho pezo buez;
ho lakad a rin da veva eüruz en ho pro;

Gouzoud a reot neuze ez on-me an Aotrou:
ar pezh am eus lavaret, hen ober a rin. Setu komz an Aotrou.

+++++

SALM I29 / 1-2, 3-4ab, 4c-6, 7-8.

Diskañ: Doue zo eur mor a drugarez,
Gand largentez e ro ar zilvidigez.

1. Euz an toull don ha teñval, e hopan d'ho kervel, Aotrou Doue;
va Doue, selaouit va mouez.
2. Troit ho tiskouarn da gleved va 'fedenn virvidig.
3. Ma sellit piz ouz ar pehejou, Aotrou, piou a hello herzel?
4. N'eo ket evelse, rag ganeoh e kaver ar pardon,
bez' e heller ho servicha gand doujañs.
- 4c. Va fizians a lakan en Aotrou Doue, fizians am eus en e bromesa.
- 5-6. Fizioud a ran war an Aotrou, surh eged ar gedour-noz war houlou an deiz.
7. Surroh eged ar gedour o hortoz goulou-deiz,
ra lako Israel e fizians en Aotrou Doue.
Rag an Aotrou 'zo eur mor a drugarez,
gand largentez e ro ar zilvidigez.
8. Eñ a zaveteo Israel euz e oll behejou.

+++++

Eil Lennadenn Bloavez A - Ar memez Doue e-neus resusitet Jezuz
a raio deom ivez beva en-dro.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN ROM. (8/8-11)

8. Va breudeur, an dud a vev o heulia youlou fall an natur
n'hellont ket plijoud da Zoue.
9. C'hwi, avad, n'oh ket renet gand an natur fall, med gand ar spered,
pegwir emañ Spered Doue o veva ennoh.
Ar re n'o deus ket Spered an Aotrou Krist, n'emaint ket en e gerz.
10. Ma 'mañ eta an Aotrou Krist ennoh,
ar horv a zo sujet d'ar maro ablamour d'ar pehed,
med ar spered a zo buez ablamour d'ar justis.
11. Ha ma vev ennoh Spered an hini e-neus savet Jezuz a douez ar re varo,
hennez hag e-neus savet Or Zalver Jezuz euz a varo da veo
a roio buez ive d'ho korvou sujet d'ar maro,
dre e Spered a zo o veva ennoh.

+++++

SALUD D'AN AVIEL - Diskan: Meuleudi deoh, Aotrou Krist...

Me eo a zo an adsao da veo hag ar vuez, (eme Jezuz,)
Neb a vev gand feiz ennon, ne varvo ket da viken.

PENNAD EUZ AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (11/1-45)

- . Epad m'emañ Jezuz en tu all d'ar ster Yordan,
1. ez eo kouezet klañv Lazar, eun dén euz Betani,
bourhadenn Mari ha Marta, c'hoar dezi.
2. Mari eo ar vaquez he deus bet skuillet louzou c'hwez-vad war an Aotrou,
ha sehet dezañ e dreid gand he bleo;
breur dezi eo Lazar, an hini klañv.

3. An diou hoar a gas kelou da Jezuz: "Aotrou, an hini a garit a zo klañv."
4. Pa 'neus klevet, Jezuz a lavar:
"Ar hleñved-mañ ne gas ket d'ar maro; evid gloar Doue eo,
evid ma vo diwarnañ rentet gloar da Vab Doue."
5. Karantez e-neus Jezuz evid Marta, ha Mari he hoar, ha Lazar.
6. Goude ar helou euz kleñved Lazar,
e chom koulskoude daou zevrez c'hoaz er memez leh.
7. Goudeze, e lavar d'an diskibien: "Deom en-dro da Vro-Judea."
8. Hag an diskibien da lavared dezañ:
"Mestr, nevez 'so e klaske ar Juzevien ho laza a daoliou mein,
hag ez it en-dro du-ze?"
9. Respont a ra Jezuz: "Daoust ha ne vez ket sklêr epad daouzeg eur an deiz?
An neb a gerz dindan lagad an deiz ne dapo ket lamm,
ablamour ma wel sklerijenn ar bed-mañ;
10. Med, ma vale en noz, e stoko e dreid, dre ziouer a sklerijenn."
11. Ouspenn-ze, e lavar dezo c'hoaz: "Or mignon Lazar a zo kousket,
mond a ran en hent d'e denna euz e gousk."
12. Setu an diskibien da lavared dezañ:
"Aotrou, ma 'mañ gand e gousk, e pareo."
13. Hogen, euz e varo eo e-noa komzet Jezuz,
hag ind a zoñje dezo e oa euz ar housk pemdezieg.
14. Jezuz neuze a ziskler frêz dezo: "Lazar a zo marvet;
15. ha laouen on o veza ma n'edon ket war al leh,
ablamour deoh, evid m'ho pezo feiz.
Med bremañ, deom beteg ennañ."
16. Setu Tomaz - a reer ar Gevell anezañ - da lavared d'an diskibien all:
"Deom ivez, ma varvim gantañ."
17. Neuze, pa zigouez e Betani, Jezuz a gav Lazar dija pevar devez 'so er béz.
18. Bez' emañ Betani tost da Jeruzalem, war-dro eun hanter eur bale.
19. Setu ez eus deut kalz Juzevien da weled Marta ha Mari,
d'ober dezo o gourhemennou a gañv evid o breur.

20. Marta, pa glev emañ Jezuz o tond, a ya a-benn hent dezañ,
epad ma chom Mari azezet en ti.
21. Lavared a ra Marta da Jezuz: "Aotrou, ma vijeh bet emañ,
ne vije ket bet marvet va breur.
22. Med bremañ c'hoaz, her gouzoud a ran,
kement tra a houlennoh digand Doue, Doue hénn roio deoh."
23. Jezuz a lavar dezi: "Sevel a ray ho preur a varo da veo."
24. — Gouzoud a ran, a respont Marta, e savo da veo d'an deiz diweza,
pa zavo da veo an oll dud varo."
25. Jezuz a lavar dezi: "Me eo a zo an adsao da veo hag ar vuez;
an neb e-neus feiz ennon, ha pa ve bet marvet, a vevo;
26. ha kement hini a vev gand feiz ennon, ne varvo ket da viken.
Ha kredi 'rit kement-se?
27. — Ya, Aotrou, emezi, kredi a ran-me ez oh-c'hwi ar Zalver, Mab da Zoue,
an hini 'zo da zond er bed."
28. Grêt ganti ar respont-se, Marta a deh kuit
hag a ya da hervel he hoar Mari; lavared a ra dezi didrouz:
"Ar Mestr a zo aze hag a lavar dit dond."
29. Amzer dezi kleved, Mari a zav dioustu hag a ya d'e gaoud.
30. Jezuz n'eo ket antreet c'hoaz er vourhadenn;
chomet eo el leh m'he doa Marta kavet anezañ.
31. Ar Juzevien a zo en ti gand Mari, oh ober dezi o gourhemennou a gañv,
pa welont anezi savet prim hag eet er-mêz, a gerz d'he heul:
"D'ar béz, emezo, ema-hi o vond da skuill daelou."
32. Mari eta a zigouez el leh m'eo chomet Jezuz,
ha, pa wel anezañ, a gouez e-harz e dreid hag a lavar dezañ:
"Aotrou, ma vijeh bet emañ, ne vije ket bet marvet va breur."
33. Jezuz neuze, o weled anezi o ouela,
hag ar Juzevien deut d'he heul o ouela ivez,
a zant ennañ skrij ha strafuill.

34. Goulenn a ra: "E peleh ho peus laket anezañ?"
 — Aotrou, emezo, deuit ha gwelit."
35. Ha Jezuz a zeu an dour en e zaoulagad.
36. Kén ma lavar ar Juzevien:
 "Gwelit 'ta pebez karantez e-noa evitañ."
37. Med lod anezo a lavar:
 "Hemañ hag e-neus digoret e zaoulagad d'an hini dall,
 ha ne helle ket mired ouz an dén-mañ da vervel?"
38. Jezuz, o skrija adarre, a gerz beteg ar béz,
 a zo anezañ eur heo, gand eur mên d'e stañka.
39. Lavared a ra Jezuz: "Tennit ar mên kuit."
 Ha Marta, c'hoar an hini maro, a lavar dezañ:
 "Aotrou, c'hwéz a zo gantañ, rag ar pevare devez eo dezañ."
40. Respont a ra Jezuz dezi: "Ha n'am eus ket lavaret deoh:
 m'ho peus feiz, e weloh gloar Doue?"
41. Setu e tenner ar mên kuit.
 Ha Jezuz, e zaoulagad savet d'an neh, a lavar:
 "Tad, trugarez deoh da veza va zelaouet.
42. Me 'ouie, me, e selaouit ahanon atao,
 med ablamour d'ar boblad tud a zo amañ am eus komzet,
 evid ma kredint ez eo c'hwi ho peus va digaset."
43. O veza komzet evelse, e lak oll nerz e vouez da grial:
 "Lazar, deuit er-mêz."
44. Ha kerkent e teu an hini maro er-mêz, lurennet e dreid hag e zaouarn,
 eul liñsel en-dro d'e benn.
45. Jezuz a lavar dezo: "Distagit dezañ e lurennou,
 ha lezit anezañ da vond."

+++++ Evid al lennadenn diverret, gwelit amañ war-lerh.

An heveleab lennadenn diverret

PENNAD EUZ AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN (11/3-7, 17, 20-27, 34-45)

3. C'hoarezed Lazar, Marta ha Mari, euz Betani,
a gas kelou da Jezuz: "Aotrou, an hini a garit a zo klañv."
4. Pa 'neus klevet, Jezuz a lavar:
"Ar hleñved-mañ ne gas ket d'ar maro; evid gloar Doue eo,
evid ma vo diwarnañ rentet gloar da Vab Doue."
5. Karantez e-neus Jezuz evid Marta, ha Mari he hoar, ha Lazar.
6. Goude ar helou euz kleñved Lazar,
e chom koulskoude daou zevez c'hoaz er memez leh.
7. Goudeze, e lavar d'an diskibien: "Deom en-dro da Vro-Judea."
17. Pa zigouez Jezuz e Betani, e kav Lazar dija pevar devez 'so er béz.
20. Marta, pa glev emañ Jezuz o tond, a ya a-benn hent dezañ,
epad ma chom Mari azezet en ti.
21. Lavared a ra Marta da Jezuz: "Aotrou, ma vijeh bet amañ,
ne vije ket bet marvet va breur.
22. Med bremañ c'hoaz, her gouzoud a ran,
kement tra a houlennoh digand Doue, Doue hénn roio deoh."
23. Jezuz a lavar dezi: "Sevel a ray ho preur a varo da veo."
24. — Gouzoud a ran, a respont Marta, e savo da veo d'an deiz diweza,
pa zavo da veo an oll dud varo."
25. Jezuz a lavar dezi: "Me eo a zo an adsao da veo hag ar vuez;
an neb e-neus feiz ennon, ha pa ve bet marvet, a vevo;
26. ha kement hini a vev gand feiz ennon, ne varvo ket da viken.
Ha kredi 'rit kement-se?
27. — Ya, Aotrou, emezi, kredi a ran-me
ez oh-c'hwi ar Zalver, Mab da Zoue, an hini 'zo da zond er bed."

- [illegible]

Pemped Sul euz ar Horaiz - OREZONOU AN OVERENN

Kempedenn an Digor

Pedom Doue.- Aotrou Doue, ablamour d'e garantez evid an dud
e-neus ho Mab gouzañvet ar maro:
lakit en or halonou, ni ho ped, eur garantez hag a denno d'e hini,
evid ho kloar ha servij or breudeur.
Drezañ hag a zo beo ha leun a hloar,
Doue ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.

War ar provou

Selaouit or pedennou, Doue oll-halloudeg:
ho servicherien sklerijennet ganeoh war ar feiz kristen,
ra vo neteet ha santelleet o ene dre ar zakrifis-mañ.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

Goude komunia

Plijet ganeoh rei deom ar hras, Aotrou Doue,
da veza bepred izili beo euz an Aotrou Krist,
a resevom e Gorr hag e Wad er gomunion.
Eñ hag a zo beo ha leun a hloar, Doue ganeoh ha
gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.

=== Da gloza ar bedenn zul, e heller lavared:

Roit dorn d'ho fugale gristen, Aotrou Doue,
ha roit dezo o goulennou, n'eo ket ablamour d'o meritou,
med en ano ho Mab karet e-neus gouzañvet e Basion evito,
Jezuz Krist, or Zalver.- R. Amen.

†=†=†=†=†=†=†=†=†=†

SUL AR BLEUNIOU HAG AR BASION

Notenn.- Lakad a reom amañ da genta lidou ha pedennou prosession ar beuz pe al lore, diwar al levr-overenn nevez.

1. En deiz-mañ eo bet antreet Mab an dén e kêr Jeruzalem evid seveni Mister e Bask (da lavared eo, e varo hag e adsao da veo). Rag-se, en oll overennou, e tleer digas da zoñj euz an donedigez-se: araog an overenn vrasa, gand ar brosession pe gand an antre solanel; en overennou all, gand an antre plên. Evelato, en overennou all-se, ma vez eun niver braz a dud, e heller ober c'hoaz an antre solanel, med ar brosession ne vo ket grêt eun eil gwech.

A) AL LID GAND PROSESSION

- 2-3. Erru an eur, eh en em gav an dud el leh merket, en diavêz d'an iliz, bodou palmez, beuz pe lore en o daouarn. Ar beleg, gand ar re 'zo ouz e zervicha, a zigouez eno ive, gwisket evid an overenn gand dillad liou ruz.
4. Da zigeri al lid, e kaner an antivonenn-mañ, pe eur han all:
 "Hozanna evid Mab David! Benniget an hini a zeu en ano Doue!
 Roue Israel eo! Hozanna e barr an neñvou!"
5. Salud d'ar bobl hag ali da gemer perz er gouel, evelhénn pe demheñvel:

Va breudeur kër, epad ar Horaiz-mañ on eus nevezet or halonou, dre ar bedenn, ar binijenn hag an oberou a garantez. Emaom amañ hirio, unanet gand an Iliz a-béz, evid digeri ar zizun a lidom enni mister braz Pask Or Zalver.

Araog peurechui ar mister-se euz or zilvidigez, o vervel war ar groaz hag o sevel beo euz ar béz, Or Zalver a zo bet antreet gand lid braz e kêr Jeruzalem. An donedigez-se a lidom bremañ adarre, evel beo bloaz. Gand feiz ha gand gwir garantez, ni a gerzo da heul Jezuz Krist: unanet gantañ en e varo, e kavim on lod ivez en e adsao da veo hag en e vuez nevez.

6. Ar bedenn war ar bobl a lavar goudeze, unan euz an diou-mañ:

- a) Pedom Doue.- Doue oll-halloudeg ha peurbadel, plijet ganeoh + benniga ar bodou hag ar skourrou-mañ; goude m'on-no kerzet laouen da heul Jezuz Krist, or Roue, grit deom mond gantañ beteg Jeruzalem ar baradoz. Eñ hag a zo beo ha leun a hloar, Doue ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll-viskoaz da virviken.- R/. Amen.
- b) Pedom Doue.- En ho madelez, Aotrou Doue, sellit ouz pobl ho pugale, a 'fell dezo renta gloar deoh en eur vond laouen a-benn hent d'ar Zalver benniget; ar hras a houlennom diganeoh d'e weled heb kaoud aon, pa zeuio en-dro da varn an oll dud. Eñ hag a zo.....

7. Aviel an donedigez da Jeruzalem a vo lennet gand an diagon, ma'z eus unan, pe gand ar beleg. Er bloavez B (1970), e vo unan euz an daou a vo kavet pelloh, hervez sant Mark pe hervez sant Yann.

8. Goude eur brezegenn verr, ma kav mad heh ober, ar beleg a lak ar brosesion da loha, gand eun ali evel hemañ, pe gand komzou heñvel:

"Va breudeur kër, d'on tro bremañ, greom da Jezuz kén braz enor ha m'o doa grêt tud an amzer-se e Jeruzalem. Deom en hent war-lerh ar groaz."

9. E penn ar brosesion e kerz ar groaz; da genta war he lerh e teu ar beleg hag ar re 'zo ouz e zervicha, ha goudeze ar bobl.

Epad ar brosesion, e kaner ar pezh a zo merket amañ, pe kanou all:

Diskan 1 (gand ar Salm 23) - Bugale an Hebreed, bodou olived ha palmez en o daouarn, a zo eet a-benn hent d'ar Zalver, en eur gana a bouez penn: Hozanna e barr an neñvou!

Diskan 2 (gand ar Salm 46)- Bugale an Hebreed a lede o mantilli war an hent, hag a gana a bouez penn: Hozanna evid Mab David!

Benniget an hini a zeu en ano Doue!

Diskan 3 - Gloar hag enor, ha meuleudi deoh, Aotrou Krist, Roue ha Salver,
ho peus klevet ar vugale laouen o kana deoh an Hozanna.

1. Roue Israel oh c'hwi, euz lignez brudet David,
c'hwi ar Roue benniget, o tond en ano Doue.
2. Ho meuli 'ra an oll Elez ha sperejou eüruz an neñv,
an dud ivez er bed-mañ, hag an oll grouadurien.
3. Pobl an Hebreed, gand bodou palmez, 'zo eet en arbenn deoh;
setu ni bremañ o tigas deoh pedennou, kan ha meuleudi.
4. Ganto oh bet meulet pa oah tost d'ho Pasion;
pa zeuom-ni d'ho meuli, emaoch e gloar ho paradoz.
5. An dud-se 'zo bet plijet deoh; ra blijo deoh ivez or harantez.
Roue mad, Roue trugarezuz, a gar kement tra 'zo mad.

10. Pa dremener an nor da vond en iliz, kemer ar han-mañ, pe unan heñvel:

Da heul ar Zalver o tond er gêr zantel, emañ bugale an Hebreed
oh embann e tle sevel da veo Mestr ar vuez:

- * Bodou palmez en o daouarn, e kanont a bouez penn: Hozanna e barr an neñvou!
- Y. P'o deus klevet tud ar bobl emañ Jezuz o tond e kêr Jeruzalem,
e kerzont a benn hent dezañ: * Bodou palmez....

11. Ar beleg a gerz beteg an aoter hag a bok dezi. Ma vez tro d'hen ober, e lak
ezañs da vogedi, oh ober tro an aoter. Goudeze ez a d'e gador, ha dioustu
e lavar ar gempedenn, o lezel a-gostez peb tra all euz lidou an digor:

KEMPEDENN. - Pedom Doue. - Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
evid diskouez d'an dud penaoz en em izellaad, c'hwi ho peus grêt
d'ho Mab, or Zalver, diskenn da gemer on natur-dén ha mervel er groaz:
roit deom eta ar hras da veza sklerijennet
gand ar henteliou a gavom en e Basion,
ha da gaoud perz en e vuez nevez pa'z eo savet a varo da veo.
Eñ hag a zo beo ha leun a hloar, Doue ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll-viskoaz da virviken. - R/. Amen.

B) LID AN ANTRE SOLANEL (e diabarz an iliz)

12. Leh n'eus ket tu da ober prosesion en diavêz d'an iliz, e lider donedigez Or Zalver gand an antre solanel en diabarz, evel m'eo merket amañ.
13. Emañ an dud fidel pe dirag an nor vraz, pe en diabarz d'an iliz, bodou pe skourrou ganto en o daouarn. Ar beleg, gand ar re 'zo ouz e zervicha, hag ivez un toullad tud fidel, a ya (en diavêz d'ar heur) en eul leh êz awalh evid ma vo gwelet ha klevet gand ar peb muia euz an dud.
14. Al lid neuze a zigor evel merket uhelloh, n° 4-7, da lavared eo: euz kan an digor beteg goude an Aviel. Mond a ra ar beleg neuze, ar groaz en e raog, a-dreuz an iliz beteg ar heur, tra ma kaner (uhelloh n° 10):
"Da heul ar Zalver o tond...", pe eur han all.
15. Evel an n° 11 : salud d'an aoter, orezon gempedenn.

C) LID AN ANTRE PLEN

16. An dra-mañ 'zo evid an overennou all euz an deiz, nemed mad e vefe kavet, ablamour d'an niver braz a dud, ober a-nevez an antre solanel.
17. Tra ma kerz ar beleg etrezeg an aoter, e kaner (uhelloh n° 10): "Da heul ar Zalver o tond", pe eur han all gand menozioù heñvel.
Ar beleg a bign ouz an aoter hag a bok dezi. Mond a ra d'e gador, hag eno e ra ar zalud d'ar bobl. N'eus na lid a binijenn, na Kyrie: dioustu e lavar ar beleg ar gempedenn (uhelloh n° 11).

÷==÷÷ NOTENN evid lid ar Skritur Zakr en overenn an deiz-mañ:

Tri bennad lenn a zo merket, hag ali stard a ro an Iliz lenn anezo o zri. Sklêr eo ez eo istor ar Basion an hini pouezusa, ha ne dle morse beza lezet a-gostez. Med, diouz ma tigouezo, e hell beza abegou mad da ober unan hebkén euz an diou lennadenn all, marteze zokén da lenn ar Basion hebkén.

+++++++

Donedigez Jezuz da Jeruzalem

PENNAD EUZ AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT MARK (11/1-10)

Jezuz, gand e ziskibien, a zo en hent evid gouel ar Pask.

1. Pa'z int deut tost da Jeruzalem, sko ouz Betfaje ha Betani, dirag Menez an Olived, Jezuz a gas daou euz e ziskibien, en eur lavared dezo:
2. "It d'ar vourhadenn a zo dirazoh; kerkent hag eet e-barz, e kavot eun azen yaouank staget, ha n'eus bet dén c'hoaz azezet warnañ. Distagit anezañ ha digasit ganeoh.
3. Ma houlenn unan bennag ouzoh: "Petra rit aze?"
respontit: "An Aotrou e-neus ezomm anezañ",
ha dioustu e lezo anezañ da zond ganeoh."
4. Mond a reont eta, hag e kavont eun azen yaouank stag e kichen eun nor, er-mêz euz an ti, hag e zistaga a reont.
5. Tud a oa eno, hag e houlennont ouz an diskibien:
"D'ober petra e tistagit an azenig?"
6. Ind a respont evel m'e-neus lavaret Jezuz, hag e lezer anezo da ober.
7. Digas a reont an azen yaouank da Jezuz, o mantilli a daolont war e gein, ha Jezuz a azez warnañ.
8. Kalz tud neuze a led o mantilli war an hent,
ha lod all bodou trohet ganto er parkeier.
9. Ar re a gerze araog, koulz hag ar re a zeu war-lerh, a youh a bouez penn:
"Hozanna! Benniget an hini a zeu en ano Doue!"
10. Benniget ar rouantelez o tond, hini David, on tad.
Hozanna e barr an neñvou!

==÷==÷ E-leh an Aviel-mañ, e heller kemer hini sant Yann,
(er bajenn war-lerh).

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (12/12-16)

12. En amzer-se, an niver braz a dud deut evid gouel ar Pask,
p'o deus klevet emañ Jezuz o tond e kêr Jeruzalem,
13. a gemer bodou palmez hag a gerz a benn hent dezañ;
youhal a reont a bouez penn:
"Hozanna! Benniget an hini a zeu en ano Doue, Roue Israel eo!"
14. Kavet e-neus Jezuz eun azen yaouank, hag azezet eo warnañ,
hervez ma verk ar Skritur Zakr:
15. "Bezit dineh, merh Sion: setu da Roue o tond,
azezet war ebeul eun azenez."
16. Kement-se n'eo ket bet intentet gand an diskibien war an taol;
med, goude m'eo bet savet Jezuz d'e hloar,
eo deut sonj dezo e oa skrivet an traou-se diwar e benn
hag e oa bet grêt evitañ evel ma oa merket.

***+=+=+=+

SKRITUR ZAKR EN OVERENN SUL AR BLEUNIOU

+=+=+=+=+=+=+=+=+

Lennadenn Ia: Servicher Doue a zoug e boaniou
gand oll nerz e galon.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS (50/4-7)

4. An Aotrou Doue e-neus roet din teod eun diskibl a zesk mad e gentel,
evid ma vin gouest, dre va homzou, da gonforti ar re 'zo eet skuiz.
Beb mintin e teu d'am dihuni, da zihuni va skouarn,
din da zelaou evel ma selaou eun diskibl e vestr.
5. An Aotrou Doue e-neus digoret din va skouarn.
Me n'am eus ket enebet, n'am eus ket tennet a-dreñv.

6. Va hein am eus troet d'ar re a skoe warnon,
ha va dioujod d'ar re a ziframme va baro.
N'am eus ket dizroet va fas diouz an dismegañsou hag an taoliou krañch.
7. An Aotrou Doue eo a zeu d'am sikour:
rag-se ne zantan ket an dismegañsou,
rag-se am eus laket va fas ken kaled hag eur mên,
ha gouzoud a ran n'am-mo ket méz da gaoud.

+++++

SALM 21 / 8-9,17-18a,19-20,23-24

Diskan: Va Doue, va Doue, perag ho peus va dilezet? (Salm 21/2a)
.....
pe euz ar hantik "Doue gwir bried d'an eneu" (N^o 41)

8. Oll ar re am gwel a ra goap ouzin, a astenn o muzellou hag a hej o fenn.
9. Fizioud a ra war an Aotrou, emezo, ra zeuio d'e zilivra!
d'e zavetei, pa blij kement dezañ!
17. En-dro din ez eus eur vandenn chas; gand eur bagad tud fall on kelhiet;
toulla 'reont va daouarn ha va zreid,
- 18a. gouest on da gonta an oll eskern euz va horv.
19. Iodenna a reont va dillad etrezo; war va mantell e tennont ar zord.
20. Med c'hwi, Aotrou Doue, na jomit ket pell diouzin;
c'hwi, va nerz, deuit buan d'am zikour!
23. Bruda a rin hoh ano dirag va breudeur;
e kreiz ar bobl e kanin ho meuleudi.
24. C'hwi oll, tud a zoujañs Doue, meulit anezañ;
C'hwi oll, bugale e bobl, roit gloar dezañ.

+++++

Eil lennadenn: Pegen izel eo diskennet Mab Doue
evid or zavetei.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-FILIP (2/6-11)

6. Va breudeur, Jezuz Krist, pa oa en e stad a Zoue,
n'eus ket fellet dezañ derhel groñs d'ar renk a lak anezañ par da Zoue;
- 7 er hontrol, diskennet eo ken izel ha netra,
kemeret gantañ eur stad a sklavour, deut da veza heñvel ouz an dud;
anavezet eo bet evel eun dén etouez ar re all.
8. En em izelleet e-neus, ha sentuz eo bet beteg ar maro,
ar maro war ar groaz zokén.
9. Ablamour da-ze e-neus Doue savet anezañ d'an uhella,
ha roet dezañ an ano a zo dreist da beb ano.
10. Rag-se, dirag ano Jezuz e tle an oll plega o daoulin,
en neñv, war an douar ha dindan an douar,
11. ha peb teod a dle diskleria ez eo Jezuz Krist an Aotrou,
evid gloar Doue an Tad.

+++++

SALUD D'AN AVIEL - Diskan: Meuleudi deoh, Aotrou Krist!
Meuleudi deoh, Salver ar bed!

Evidom-ni eo bet sentuz Or Zalver,
beteg ar maro, hag ar maro war ar groaz.
Ablamour da-ze e-neus Doue savet anezañ d'an uhella,
ha roet dezañ an ano 'zo dreist da beb ano.

+++++

(Istor ar Basion a heller diverra, diouz red,
o kemer hebkén ar pennad 15/1-39)

PASION OR ZALVER JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (14/1 - 15/47)

1. Gouel ar Pask a oa dindan daou zevez,
hag edo pennoù braz ar veleien hag ar skribed o klask
dre beseurd tro-bleg tapoud krog e Jezuz, evid e lakaad d'ar maro.
2. Hag e lavarent kenetrezo: "Arabad e vefe epad ar gouel,
gand aon na zavfe trouz etouez ar bobl."
3. Jezuz a oa e Betani, e ti Simon al Lor; eet e oa ouz taol,
pa zeu eur vaouez, ganti eur podad louzou c'hwéz-vad pur ha talvouduz-braz.
Terri a ra ar pod ha skuill ar c'hwéz-vad war benn Jezuz.
4. Ouspenn unan a zo feuket hag a zoñj: "Da betra koll evelse louzou c'hwéz-vad?
5. Gelllet e vije bet e werza ouspenn tri-hant diner
ha rei ar priz d'ar beorien."
Hag e hrozmolont a-eneb dezi.
6. Jezuz a lavar: "Lezit anezi, perag ober poan dezi?
Eun dra vad he deus grêt em heñver.
7. Rag ar beorien ho peus atao en ho touez,
ha pa girit e hellit ober vad dezo; me, avad, n'ho pezo ket atao.
8. Ar pezh a oa gouest d'ober he deus grêt ar vaouez-mañ:
a-vremañ he deus balzamet va horv a-benn ma vo sebeliet.
9. E gwirionez, m'hén lavar deoh,
e kement leh ma vo prezeget an Aviel dre ar bed,
e vo displeget ivez ar pezh he deus grêt, en enor dezi."
10. Judaz an Iskariot, unan euz an daouzeg abostol, a zo eet neuze da gaoud
pennoù braz ar veleien, da ginnig lakad Jezuz etre o daouarn.
11. Ouz e glevet, int laouen kenañ, hag e reont marhad gantañ;
hag eñ, azaleg neuze, a glask an tu d'e lakad etre o daouarn.

12. Da zeiz kenta ar gouel, e veze lazeta an oan-pask,
hag an diskibien a houlenn ouz Jezuz:
"Peleh e fell deoh ez afem da bourchas an traou,
deoh da zebri ar Pask?"
13. Kas a ra daou euz e ziskibien, en eur lavared dezo:
"It e kêr; erruoud a ray ganeoh eun dén o tougen eur podad dour.
14. Kerzit d'e heul, hag en ti e-leh ma antreo, lavarit d'ar perhenn:
"Ar Mestr a houlenn diganeoh: Peleh emañ ar zal
ma hellin enni debri ar Pask gant va diskibien?"
15. Diskouez a raio deoh eur zal war al laez (pe: er zolier),
frank ha kempenn; eno pourchasit peb tra evidom."
16. Setu eet an diskibien e kêr; kaoud a reont an traou evel m'e-neus
lavaret Jezuz, ha pourchas (pe: prepari) a reont ar Pask.
17. Deut an abardaez, Jezuz a zeu gant an daouzeg.
18. Epad m'emañ ouz taol, o tebri, Jezuz a lavar dezo:
"E gwirionez, m'hen lavar deoh,
unan ahanoh am gwerzo, hag emañ o tebri ganin."
19. Mond a reont trist, hag an eil goude egile e houlennont outañ:
"Ha me e vefe?"
20. Respont a ra Jezuz: "Unan euz an daouzeg eo,
hag a lak e zorn er plad war eun dro ganin.
21. Evid gwir, Mab an dén a zo o vond kuit, hervez m'eo skrivet diwar e benn;
med maleüruz an hini a zo o werza Mab an dén!
Gwelloc'h d'an dén-se ne vije ket bet ganet."
22. Emañ c'hoaz o tebri, ha setu Jezuz o kemer bara:
o veza lavaret ar vennoz, e torr anezañ hag e ro d'e ziskibien,
en eur lavared: "Kemerit, va horv eo hemañ."

23. Kemer a ra ivez eur halirad gwin: o veza lavaret ar vennoz,
hen ro dezo, hag oll eh evont dioutañ;
24. lavaret e-neus dezo: "Va gwad eo hemañ, hini an emgleo nevez,
skuillet evid e-leiz a dud.
25. E gwirionez, m'hen lavar deoh, n'evin mui euz ar frouez gwinienn-se,
beteg an deiz ma evin eur gwin nevez e rouantelez Doue."
26. Goude ar bedenn drugarekaad, ez eont er-mêz etrezeg Menez an Olived.
27. Jezuz a lavar dezo: "C'hwi oll a vo laket da goueza;
rag merket eo er Skritur Zakr: Skei a rin gand ar pastor,
hag an deñved a vo strevet a beb tu.
28. Hogen, pa vin savet beo en-dro, me 'yelo en ho raog da Vro-Halilea."
29. Per neuze a lavar dezañ: "
"Ha goude ma teufe an oll da goueza, me ne rin ket."
30. Respont a ra Jezuz dezañ: "E gwirionez, m'hen lavar dit,
te, hirio, en noz-mañ, abarz m'e-no ar hillog kanet diou wech,
te az pezo nahet ahanon teir gwech."
31. Med eñ a zalhe da lavared startoh c'hoaz:
"Ha pa ve red din mervel ganeoh, n'ho nahin ket."
Hag oll e lavarent kemend all.
32. Digouezoud a reont en eul leh anvet Jetsemani.
Jezuz a lavar d'e ziskibien: "Azezit amañ, epad ma vin o pedi."
33. Kas a ra gantañ Per, Jakez ha Yann,
hag e teu da goueza warnañ spont hag anken.
34. Lavared a ra dezo: "Trist da vervel eo va ene; chomit amañ, ha beillit."
35. Eet eun tammig pelloh, e kouez d'an douar; goulenn a ra en e bedenn
pellaad dioutañ an eur-se, ma hell beza pelleet.
36. Lavared a ra: "Abba! Tad! c'hwi a hell peb tra:
pellait diouzin ar halirad-mañ;
evelato, ra vo grêt ho polontez-c'hwi, nann va hini."

37. Dond a ra en-dro, hag e kav e ziskibien kousket. Lavared a ra da Ber:
"Simon, kousked a rez? N'ah eus ket gellet beilla eun eur zokén?
38. Beillit ha pedit, evid diwall da goueza en tentadur;
ar spered a zo prim, med natur an dén a zo gwan."
39. Pellaad a ra adarre, ha pedi gand an heveleb komzou.
40. Pa zistro d'o haoud, e kav anezo kousket c'hoaz,
rag pounner e oa eet o daoulagad,
ha ne ouient ket petra da respont dezañ.
41. Evid an trede gwech e teu evelse, hag e lavar dezo:
"Kouskit bremañ ha diskuizit. Awalh eo. Deut eo an eur:
emañ Mab an dén o vond da goueza etre daouarn ar beherien.
42. Savit! Deom! An hini 'zo ouz va gwerza a zo tost."
43. Komz a ra c'hoaz, pa zigouez Judaz, unan euz an daouzeg,
ha gantañ eur vandennad tud, klezeier ha bizier en o daouarn,
kaset gand pennou braz ar veleien, ar skribed ha re goz ar bobl.
44. Eur zin e-noa roet an treitour dezo:
"An hini a roin eur pok dezañ, hennez eo;
krogit ennañ, ha bezit war evez evid kas anezañ ganech."
45. Kerkent ha m'eo digouezet, e tosta ouz Jezuz hag e lavar dezañ:
"Rabbi! (Mestr!)", hag e stard anezañ en e zivreh.
46. Ar re all neuze a daol o daouarn warnañ hag a zalh anezañ mad.
47. Unan euz ar re 'zo en-dro da Jezuz a denn e gleze, a sko eun taol
gand mevel ar beleg-meur, hag a droh dezañ e skouarn.
48. Jezuz a zav e vouez da lavared d'an dud-se:
"Evel pa vefen bet eul laer, ez oh deut gand klezeier ha bizier
da baka ahanon.
49. Bemdez e vezen en ho touez en Templ, o rei va helennadurez,
ha n'ho peus ket kroget ennon. Med bremañ eo evid ma teuo da wir
ar pez a zo merket er Skritur Zakr."
50. E ziskibien neuze a zilez anezañ hag a deh kuit.
51. Eur paotr yaouank, koulskoude, a jom da heul Jezuz, gand eul liñser
hebkén war e gorv; kregi a reer ennañ, med eñ a zispeg euz e liñser,
hag en noaz eh en em denn kuit.

53. Digas a reer Jezuz da di ar Beleg-meur,
hag eno en em zastum oll bennou braz ar veleien,
re goz ar bobl hag ar skribed.
54. Per e-neus heuliet Jezuz a-bell, beteg ti ar Beleg-meur, e diabarz ar porz.
Azezet e-touez ar zervicherien, eo eet da domma e kichen an tan.
55. Ar veleien vraz hag ar Huzul a-béz a glask, a-eneb Jezuz,
eun testeni bennag evid e gondaoni d'ar maro, ha ne gavont ket.
56. Kaer o deus meur a hini dougen fals testeni a eneb dezañ,
n'eo ket heñvel an testeniou an eil ouz egile.
57. Sevel a ra eur re bennag da zougen fals testeni evelhénn:
58. "E glevet on eus o lavared:
Me a ziskaro an templ-mañ savet gand dorn an dud,
ha dindan tri devez e savin unan all, na vo ket diwar dorn an dud."
59. Ha war ar poent-se zokén, ne oa ket heñvel o zosteniou.
60. Ar Beleg-meur, neuze, a zav en e za e-kreiz an dud bodet eno,
hag a houlenn ouz Jezuz:
"N'ho peus netra da respont d'an tamallou a ra deoh ar re-mañ?"
61. Jezuz a jom dilavar ha ne respont netra.
Ar Beleg-meur a houlenn outañ c'hoaz:
"Ha bez' oh-c'hwi ar Mesiaz, Mab an Doue benniget?"
62. Respont a ra Jezuz: "Ya, bez' (ez) on,
ha c'hwi a welo Mab an dén azezet en tu deou da Zoue oll-halloudeg
hag o tond war goabrennou an neñv."
63. Ar Beleg-meur, goude beza roget e zillad, a lavar neuze:
"Peseurd ezomm on eus c'hoaz da gaoud testou?"
64. E glevet ho peus o vlasfemi: petra 'zoñj deoh?"
Ha barnedigez an oll a gondaon Jezuz d'ar maro.
65. Lod a ziroll neuze da skopa (pe: da grañcha) outañ,
da voucha dezañ e zaoulagad ha da rei dezañ skouarnadou (pe: flahadou),

en eur lavared dezañ: "C'hoari da brofed!"

Hag ar gwardou a skoe taoliou gantañ.

66. Tra m'emañ Per en traoñ, er porz, e teu eur vatez d'ar Beleg-meur;

67. E weled a ra o tomma ouz an tan, hag, o veza sellet mad outañ,

e lavar: "Te ivez a oa gand Jezuz a Nazared."

68. Ha Per a nah krenn: "N'ouzon ket, n'on ket evid intent petra lavarit."

Hag eñ mond er-mêz war-zu ar porched.

69. Ar vatez, ouz e weled, a grog adarre da lavared d'ar re 'zo aze:

"Hemañ 'zo unan euz ar re-ze." Ha Per a nah en-dro.

70. Nebeud amzer goude, ar re 'zo aze en em lak da lavared da Ber:

"A dra zur, ez out unan euz ar re-ze, rag euz Bro-Halilea out."

71. Eñ a stag neuze da vallozi ha da doui war e le:

"Nann, n'anavezan ket an dén-se a gomzit anezañ."

72. Ha raktal, evid an eil gwech, eur hillog a daol e gan.

Per, neuze, a zeu soñj dezañ euz komzou Jezuz:

"Abarz m'e-no ar hillog kanet diou wech,

e po nahet ahanon teir gwech." Hag e teu an dour en e zaoulagad.

15/1. Abred diouz ar mintin, e ra ar veleien vraz

boda re goz ar bobl hag ar skribed gand ar Huzul-meur a-béz;

goude beza laket chadenna Jezuz,

e kasont anezañ da di Pilat, ar gouarnour.

2. Goulenn a ra Pilat outañ: "Ha bez' oh-c'hwi roue ar Juzevien?"

Respont a ra Jezuz: "C'hwi eo hen lavar."

3. Tamallou en e eneb a zav ar veleien vraz bern war vern.

4. Pilat a houlenn outañ adarre: "N'ho peus netra da respont?"

Sellit pegén braz tamallou a daolont warnoh."

5. Med Jezuz ne respont mui netra, ar pezh a laka Pilat da zouezi.

6. Hogen, da geñver gouel ar Pask, e oa ar hiz gantañ
rei dezo frankiz eur prizonier, an hini a houlennent.
7. Bez' e oa neuze an hini anvet Barabbaz,
dalhet er chadennou a-unan gand ar re o doa grêt eun taol dispah
ha lazet eun dén epad an dispah-se.
8. Pignet beteg ennañ, ar bobl a houlenn digand Pilat
ar pez a oa kustum da rei dezo.
9. Pilat a respont dezo: "Ha c'hoant ho peus e laoskfen ganeoh
roue ar Juzevien?"
10. Gouzoud a ree trawalh e oa dre warizi
o doa ar veleien vraz laket Jezuz etre e zaouarn.
11. Med ar veleien vraz a boulz ar bobl da houlenn kentoh
ma vo laosket ganto Barabbaz.
12. Pilat a zav e vouez en-dro hag a lavar dezo:
"Petra rin neuze euz an hini a anvit Roue ar Juzevien?"
13. A bouez o fenn e respontont: "Stagit anezañ ouz ar groaz!"
14. Ha Pilat: "Peseurd droug e-neus grêt eta?"
Kreñvoh c'hoaz e youh an dud: "Stagit anezañ ouz ar groaz!"
15. Pilat, neuze, c'hoant gantañ plijoud d'ar bobl, a laosk ganto Barabbaz;
ober a ra skourjeza Jezuz, ha lezel ganto da veza lakeet er groaz.
16. Ar zoudarded a gas anezañ ganto e diabarz ar pretordi, e palez ar gouarnour,
ha boda a reont ar gompagnunez a-béz.
17. E wiska a reont gand eur vantell ruz-moug,
ha war e benn e lakont eur gurunenn spern grêt ganto.
18. Hag e teuont d'e zaludi: "Salud, roue ar Juzevien!"
19. ha da skei war e benn gand eur gorzenn, da skopa outañ,
da blega o daoulin evid stoui dirazañ.
20. Goude beza grêt goap outañ, e tennont digantañ ar vantell ruz-moug,
hag e lakont dezañ e zillad;
neuze e kasont anezañ er-mêz, evid mond d'e staga ouz ar groaz.

21. Kemer a reont, evid dougen ar groaz, eun dén a dremene dre eno,
o tond d'ar gêr euz ar park: Simon a Gyren, tad Aleksandr ha Rufuz.
22. Kas a reont Jezuz beteg al leh anvet Golgotha,
da lavared eo: leh ar hlopenn - ar Halvar.
23. Kinnig a reont dezañ da eva gwin mesket mir gantañ,
med ne 'fell ket dezañ kemer.
24. E staga 'reont ouz ar groaz, ha goudeze e lodennont e zillad etrezo,
en eur denna ar zord warno evid lakad e lod da bep hini.
25. Nav eur e oa, p'o deus e staget ouz ar groaz.
26. Ar skritell a verke perag eo bet kondaonet a oa merket warni
ar geriou-mañ: Roue ar Juzevien.
27. War eun dro gantañ e lakont e kroaz daou laer,
unan a zeou hag egile a gleiz dezañ.
28. Evelse e teue da wir komzou ar Skritur Zakr:
"E reñk an dorfetourien eo bet laket."
29. An dremenidi a daole outañ gwall gomzou, o heja o fenn hag o lavared:
"Aha! te eo a ziskar an Templ hag a zav anezañ en-dro dindan tri devez!
30. En em zavete da-unan, diskenn euz ar groaz."
31. Ar veleien vraz ive kenetrezo gand ar skribed
a hoarze goap hag a lavare:
"Re all e-neus saveteet, ha n'eo ket evid en em zavetei e-unan!
32. Eñ ar Mesiaz, roue Israel! ra ziskenno bremañ euz ar groaz,
ma welim ha ma kredim."
Beteg ar re 'oa staget ouz ar groaz en e gichen
a zistage outañ gwall gomzou.
33. Deut an eur a greisteiz, an deñvalijenn a gouez
hag a holo an douar a-béz beteg teir eur.
34. Da deir eur, Jezuz a daol eur griadenn gand eur vouez kreñv:
"Eloï, Eloï, lama sabaktani?"
da lavared eo: Va Doue, va Doue, perag ho peus va dilezet?

35. Lod euz ar re 'zo en-dro dezañ a lavar ouz e gleved:
 "Setu emañ o hervel Eliaz."
 36. Redeg a ra unan anezo da zouba eur spoueenn er gwin treñk,
 hag e sav anezi war veg eur gorzenn evid rei dezañ da eva,
 en eur lavared: "Lezit 'ta! gwelom hag-eñ e tevio Eliaz d'e zistaga."
 37. Med Jezuz, goude beza taolet eur griadenn vraz, a zo tremenet.

(Amañ e pleger an daoulin hag e chomer sioul eur pennad.)

38. Neuze, ar vouel euz an templ a zo bet roget dre an hanter,
 euz an neh beteg an traoñ.
 39. An ofiser, hag a oa a-dal da Jezuz, o weled penaoz e oa marvet,
 a lavar: "E gwirionez, an dén-mañ 'oa Mab da Zoue."

(Al lennadenn diverret a echu emañ: 15/1-39).

40. Bez' e oa ive merhed o solded euz a bell,
 en o zouez Mari Madalen, Mari mamm da Jakez vian ha da Joze, ha Salome;
 41- ar re-mañ, pa veze Jezuz e Bro-Halilea, a veze ouz e heul d'e zervicha -
 ha kalz merhed all, pignet d'e heul beteg Jeruzalem.
 42. Deut an abardaez, o veza ma 'z eo derhent ar zabad,
 43. setu o tond Jozef a Arimati, eun dén euz ar henta
 hag a oa euz ar Huzul-meur - eñ ivez a hortoze rouantelez Doue -;
 mond a ra hardiz da gaoud Pilat, da houlenn rei dezañ korv Jezuz.
 44. Souezet eo Pilat e vefe marvet ken buan. Goulenn a ra ouz an ofiser,
 e-neus galvet davetañ, hag-eñ eo marvet dija.
 45. Sklerijennet gand an ofiser, Pilat a ro ar horv da Jozef.
 46. O veza prenet eul liñsel, Jozef a ziskenn ar horv euz ar groaz, a lak al
 liñsel en-dro dezañ hag a zoug anezañ en eur béz toullet er roh;
 ruilla 'ra eur mên da stanka ar béz. 47. Mari Madalen ha Mari mamm Joze
 a zo oselled e peleh eo bet laket korv Jezuz.

SKRITUR ZAKR EN OVERENN AR ZUL FASK

Lennadenn Ia.

PENNAD EUZ OBEROU AN EBESTEL (10/34a,37-43)

- E ti eun ofiser euz arme Rom, e-neus e halvet da zond d'e sklerijenna,
34. Per a gomz evelhénn:
37. "Anaoud a rit-c'hwi an traou 'zo bet c'hoarvezet dre vro ar Juzevien,
ha da genta e oa e Bro-Halilea, goude ar vadiziant a brezege Yann;
38. Jezuz a Nazared, gouzoud a rit penaoz e-neus Doue sakret anezañ
dre ar Spered Santel ha karget anezañ a halloud;
tremen e-neus grêt oh ober vad, hag o rei ar pare
da gement hini a oa gwasket gand an droug-spered,
rag Doue a oa gantañ.
39. Ha ni, an Ebestel, a zo testou war an oll draou e-neus grêt
e bro ar Juzevien hag e kêr Jeruzalem,
eñ an hini o deus laket d'ar maro, o staga anezañ ouz koad eur groaz;
40. eñ ivez an hini e-neus Doue savet da veo d'an trede deiz,
ha grêt dezañ en em ziskouez,
41. n'eo ket d'ar bobl a-béz, med d'an testou dibabet a viskoaz gand Doue,
deom-ni, a zo bet o tebri hag oh eva gantañ
goude m'eo bet savet a-douez ar re varo.
42. Ha deom e-neus roet ar garg da embann ar helou d'ar bobl,
ha da rei testeni ez eo eñ
an hini e-neus Doue laket da varner ar re veo hag ar re varo.
43. Dezañ eo e ro an oll Brefeted an testeni-mañ:
ar pardon euz e behejou a reseo drezañ kement hini a lak e feiz ennañ.

+++++

SALM 117 / 1-2, 16-17, 22-23 - En deiz-mañ grêt gand an Aotrou Doue,
tridom gand levenez. Alleluia!

1. Lavarit mil bennoz da Zoue, ablamour ma 'z eo mad:
da viken e pado e vadelez.
2. Lavarit 'ta, pobl Israel: da viken e pado e vadelez.
16. Dorn Doue e-neus grêt traou kaer; dorn Doue e-neus va laket em zao.
17. Ne varvin ket, beva a rin, ha bruda 'rin oberou Doue.
22. Ar mên taolet kuit gand saverien an ti, a zo grêt anezañ ar mên-korn.
23. Gand Doue eo bet grêt kement-se: eur burzud eo dirag on daoulagad.

+++++++
Eil lennadenn.- A-unan gand Or Zalver, peb kristen
..... a zo ive savet a varo da veo.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GOLOS (3/1-4)

1. Va breudeur, savet oh da veo a-unan gand Or Zalver;
klaskit eta madou an neñv,
'leh m'emañ Or Zalver azezet en tu deou da Zoue.
2. Lakit ho sonj e traou an neñv, ha n'eo ket e re an douar.
3. Rag marvet oh bet, hag ho puez a zo bremañ eun dra guzet
a-unan gand Or Zalver, e Doue;
4. Med, pa baro splannder Or Zalver, eñ ho puez,
neuze, c'hwi ivez a baro gantañ e kreiz ar hloar.

+++++++

GWERZ "Victimae paschali" (Levr-Overenn Uguen, p. 364)

SALUD D'AN AVIEL - Alleluia! (bis). An Aotrou Krist eo on Oan-Pask deom-ni;
Deom gand levenez ouz taol Or Zalver.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (20/1-9)

1. Antronez ar zabad goude maro Jezuz, Mari Madalen a ya d'ar béz
mintin mad, pa 'z eo teñval c'hoaz;
gweled a ra ar mên lamet kuit diwar ar béz.
2. Distrei a ra d'ar red da gaoud Simon Per hag an diskibl all,
an hini 'oa karet gand Jezuz:
"Tennet eo bet an Aotrou euz ar béz, emezi,
ha n'ouzm ket e peleh o deus e laket."
3. Ha setu Per hag an diskibl all er-mêz euz an ti, o vond d'ar béz.
4. Redeg a reont o daou asamblez, med an diskibl all a red buannoh
hag a hounez war Ber: erruet eo ar henta e-tal ar béz.
5. En eur daoler eur zell e-barz, e wel al lurennoù ledet war an douar,
med chom a ra heb mond tre.
6. Simon Per a zigouez ive war e lerh, hag a ya e-barz ar béz;
gweled a ra al lurennoù war an douar,
7. hag ivez al lienenn a oa war benn Jezuz, med houmañ, e-leh beza
gand al lurennoù, a zo en eul leh a-gostez, rollet brao.
8. Neuze, d'e dro, ez a en diabarz an diskibl all,
an hini a oa deut ar henta 'tal ar béz:
gweled a ra, ha kredi a ra.
9. Rag beteg-hénn ne gomprenent ket c'hoaz ar pezh 'zo merket er Skritur Zakr:
e tle ar Zalver sevel beo a-douez ar re varo.

*** Ma vez lavaret overenn ar zul Fask diouz an abardaez,
e heller lenn eun Aviel all, e Sant Lukaz (24/13-35);
hini al lun Fask eo: gwelit e Levr-Overenn Uguen, p.369.

OREZONOU evid Overenn SUL AR BLEUNIOU

KEMPEDENN.- (Gwelit uhellou, p. 15 - Setu hi amañ en-dro:)

Pedom Doue... Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
evid rei d'an dud skoueriou beo ha deski dezo en em izellaad,
c'hwi ho peus grêt d'ho Mab, or Zalver,
diskenn da gemer on natur-dén ha mervel war eur groaz: *
roit deom eta ar hras da veza sklerijennet
gand ar henteliou a gavom en e Basion,
ha da gaoud perz en e vuez nevez pa 'z eo savet a varo da veo.
Eñ hag a zo beo ha leun a hloar, Doue ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. - R/. Amen.

WAR AR PROVOU.- Aotrou Doue, ho pedi a reom dre Basion ho Mab,
na zaleit ket da rei ho pardon:

gwir eo ne veritom ket e gaoud, med selaouit kentoh ho madelez,
ha grit ma teuio deom ar pardon-se dre ar zakrifis n'eus nemetañ.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - R/. Amen.

=== (Prefas er Haier n^o 3: euz ar Basion, p.39; euz ar Groaz, p.38)

GOUDE KOMUNIA.- Pedom Doue... Pa 'z om bet maget gand ho sakramañchou,
setu ar bedenn a reom ouzoh, Aotrou Doue: *

pegwir, dre ho Mab maro evidom, e lakit ennom an esperañs
euz ar madou a gredom enno,
drezañ adsavet da veo, grit ma'z aim da benn on hent beteg ho paradoz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - R/. Amen.

+++++

OREZONOU evid Overenn ar ZUL FASK

KEMPEDENN. - Pedom Doue...

En deiz-mañ, Aotrou Doue, dre ho Mab treh d'ar maro ha savet da-veo,
ho peus digoret deom an nor d'ar vuez peurbaduz: *
ho pedi 'reom eta d'or skoazella gand ho kras,
evid kas da benn ar zoñjou mad a lakit da ziwan ennom.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo (ha leun a hloar) ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken. - R/. Amen.

WAR AR PROVOU. -

Da heul ar provou-mañ, Aotrou Doue,
plijet ganeoh digemer pedennou ho pobl:
sakrifis an overenn, bet savet gand Jezuz pa oa gand e Bask,
war-nez gouzañv ar maro ha sevel da veo,
grit ma tigas deom ar pare evid ar vuez peurbaduz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - R/. Amen.
=== (Ar Prefas, Kaier n° 3, p.38)

GOUDE KOMUNIA. - Pedom Doue...

Skuillit ennom, Aotrou Doue, Spered santel ho karantez;
ha grit, en ho madelez, ma vo unanet ho pugale,
dezo eur galon hebkén,
goude m'ho peus o maget er zakramant-mañ,
a zo ennañ vertuz Pasion Or Zalver hag e adsao da veo.
Drezañ, Jezuz Krist, or Zalver. - R/. Amen.

+++++

B A D I Z I A N T

A R V U G A L E

+++++

PEDENNOU HA LIDOU

troet e brezoneg diwar ar RITUAL latin (Rom, 1969)

KEMPER, Meurz 1970

"BADIZIANT AR VUGALE", Pedennou ha Lidou :

Troidigez aotreet da arnod, evid an eskopti,
a-berz an Aotrou F. Parbu, Eskob Kemper ha Leon.

Kemper, d'an 12 a viz Meurz 1970.

+ V. Fave, eskob-skoazeller.

Embannet gand Kenvreuriez ar Brezoneg Eskopti Kemper ha Leon.

AR VADIZIANT ROET D'EUR HROUADUR

Ar zul eo an deiz a zigouez ar gwella evid ober eur vadiziant, rag da zul eo, dreist an deizioù all euz ar zizun, e lid an Iliz santel mister Pask Or Zalver, da lavared eo e varo war ar groaz hag e adsao a-douez ar re varo, ha diwar ar mister-se e teu d'ar gristenien ar vuez nevez a resevont er vadiziant.

Digouezoud a ra ive ober war-eun-dro badiziant an oll vugale nevez-ganet, e-leh ober meur a vadiziant er memez devez, gand peb famill d'he zro. Rag an Iliz a zo famill vraz ar gristenien, ha peb krouadur a vo, er vadi-ziant, unanet gand ar memez Aotrou Krist.

Eun dra gaer eo lida sakramant ar Vadiziant dirag pobl an dud fidel, da vianna ar gerent tosta, mignoned hag amezeien. Bez' e heller zokén ober ar vadiziant dirag ar barrez a-béz bodet en iliz, e kerz overenn ar zul. Med abegou mad a beb seurd a vo aliez evid kaoud nebeutoh a dud.

D'an tad ha d'ar vamm, gand an tad-paeron hag ar vaeronez en o hichen, e tigouez an enor da ginnig o hrouadur da veza badezet.

Ar beleg, gwisket gantañ ar zae wenn (pe ar zourpiliz) hag ar stolenn, a ya warzu an nor-dal, pe eul leh all euz an iliz, da ziambroug an tad, ar vamm, hag ar re all a zo en-dro d'ar hrouadur. Epad m'emañ ar beleg o treuzi an iliz, ar gristenien all a zo en iliz o deus tro da gana eur hantik.

× ×

Notenn.- El levrig-mañ e vo ano euz badiziant eur hrouadur hebkén.

An niverennou laket en tu kleiz d'ar bajenn a vo an heveleb re hag er Ritual galleg.

RANN GENTA

LIDOU AN DIGEMER

1. Komzou kenta ar beleg

Saludi a ra an dud deut d'ar vadiziant, hag ispisial tad ha mamm ar hrouadur, an tad-paeron hag ar vaeronez. (Hen ober a raio en eur zerhel kont euz an anaoudegez e-neus euz an dud.).

E berr gomzou, e hell digas da zoñj euz al levenez a garg kalon ar gerent pa 'z eo deut dezo o hrouadur, evel eun donezon digand Doue. Krouer ha mammenn peb buez, emañ Doue, dre ar vadiziant, o vond da rei d'ar hrouadur e vuez e-unan.

2. Ar beleg d'an tad ha d'ar vamm da genta, paeron ha maeronez da houde:

(Ar homzou roet amañ a hell beza kemmet.)

Y. Pe ano a roit d'ho krouadur?

R. N.

Y. Petra houlennit digand an Iliz evid N. ?

R. Ar Vadiziant. (pe: Ar feiz. - Gras an Aotrou Doue. etc.)

Y. Pegwir e houlennit ar vadiziant evid ho krouadur, c'hwi ho pezo da zigeri e spered da sklerijenn ar feiz, evid ma tesko, e skol Or Zalver, kared Doue hag an nesa. Ha soñjet ho peus mad e kement-se?

R. Ya, (ha gand gras Doue e raim on dever.)

Y. Ha c'hwi, tad-paeron ha maeronez, ha bez' oh prest da zikour tad ha mamm ar hrouadur evid kement-se?

R. Ya.

7. Pedenn ar Gristenien (war batrom al Litanïou, da bedi Or Zalver da genta,
hag ar Zent da houde.)

Ar Beleg: Va breudeur k  r, evid ar hrouadur a vo roet deza   bremaig gras
ar Vadiziant, evid e dad hag e vamm, e baeron hag e vaeronez,
hag evid an oll dud vadezet, pedom Or Zalver Jezuz Krist.

Diskan: Salver madelezuz, selaouit or pedenn!

Al Lenner: 1. Salver Jezuz, ho peus pr  net an dud o vervel war ar groaz
hag o sevel beo euz ar b  z, plijet ganeoh rei buez nevez ar
vadiziant d'ar hrouadur-ma  n hag e zigemer en hoh Iliz santel:

R/. Diskan: Salver madelezuz....

2. Dre ar vadiziant hag ar gonfirmasion, grit ma vo deoh eun
diskibl leun a feiz ha ma roio testeni euz hoh Aviel:
3. Roit deza  n grasou a zantelez 'hed e vuez penn-da-benn beteg
e  rusted ar baradoz:
4. Sikourit e dad hag e vamm, e baeron hag e vaeronez, da zewel
ar hrouadur-ma  n e sklerijenn ar feiz, ha dalhit bepr  d
e 'famill en ho karante  :
5. E pep hini ahanom lakit gras ar vadiziant da veva ha da
vleunia ken kaer hag en deiz kenta:

R/. Salver madelezuz, selaouit or pedenn!

8. Santez Mari, Mamm da Zoue: R/. Pedit evidom!

Sant Jozef, Tad mager da Jezuz: R/.

Sant Yann Vadezour: R/ id.

Sant Per ha sant Paol: R/ id.

(Patron (-ez) ar bugel) : R/ id.

Oll Zent ha Sentezed Doue: R/ id.

Ama  n e tigaser ar
hrouadur en-dro,
ma'z eo bet douget
er-m  z.

9. Ar beleg, da gloza ar bedenn-litani, a lavar unan euz an diou bedenn-mañ:

a/ Doue oll-halloudeg ha peurbadel, ho Mab ho peus kaset er bed evid argas pell diouzom galloud Satan, spered an droug, hag evid rei d'an dén, tennet euz an deñvalijenn, dor zigor da vond e rouantelez kaer ho sklerijenn. A greiz or halon e pedom ahanoh evid ar hrouadur-mañ: grit anezañ, pa vo gwalhet euz ar pehed orijinel, templ ho santelez ha demeurañs ho Spered Santel. Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/. Amen.

pe: b/ Aotrou Doue oll-halloudeg, ho Mab unganet ho peus kaset er bed evid rei d'an dén, dalhet gand chadennoù ar pehed, ar frankiz a zo hini ho pugale. A galon izel ho pedom evid ar hrouadur-mañ: gouzoud a rit e vo tentet gand touellerez ar bed hag e-no da enebi ouz spered an droug; rag-se, dre vertuz Pasion ho Mab hag e adsao a varo da veo, plijet ganeoh e ziframma euz galloud an deñvalijenn, e gennerza gand gras Or Zalver hag e ziwall heb ehan 'hed e vuez war an douar. Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/. Amen.

10. Ar beleg a hell neuze dibab: pe ober eun olevadur war vruched ar hrouadur, pe astenn e zorn warnañ nemedkén.

a/ Evid an olevadur: "N..., galloud Jezuz Krist or Zalver da rei nerz dit dre ar merk a ran warnout gand an oleo santel-mañ, en Aotrou Krist benniget, Doue beo ha leun a hloar a oll viskoaz da virviken.- R/. Amen.

b/ Evid astenn an dorn: "N..., galloud Jezuz Krist or Zalver da rei nerz dit, eñ hag a zo Doue beo ha leun a hloar, a oll viskoaz da virviken.- R/. Amen.

+++++

TEIRVED RANN

LID AR ZAKRAMANT

⋈⋈⋈ Mond a reer neuze daved an dour-badez, da lavared eo: pe e chapel ar Mên-badez, e traoñ pe ouz kostez an iliz, pe c'hoaz tost d'ar heur, pe er heur zokén.

11. Ar beleg, e berr gomzou, a ro ali da bedi startoh, pa'z eo deut koulz ar zakramant. Kemer a hell unan euz an daou zoare lakeet amañ, pe komzou all.

a/ Va breudeur, pedom Doue oll-halloudeg, ma plijo gantañ rei gand largentez d'ar hrouadur-mañ ar vuez nevez a zeu euz ar Spered Santel dre zakramant an dour.

pe: b/ Va breudeur, gouzoud a rit penaoz eo bet plijet gand Doue rei perz en e vuez e-unan, dre zakramant an dour, d'ar re a gred ennañ. Savom eta or halonou d'e bedi, evid ma plijo gantañ, euz ar feunteun-vadez a zo amañ, lakad da redeg dour e hras war N..., bet dibabet gand e garantez.

12. ⋈⋈⋈ Benniga an dour-badez a zo da ober bremañ, pe, ma'z eo benniget dija, lavared warnañ eur bedenn-drugarekaad. Da lavared eo: en ilizou a zo bet grêt enno nozveziad ar Zul-Fask, an dour-badez benniget neuze a virer, kement ha ma heller, penn-da-benn d'an amzer Fask. Med, en diavêz d'an amzer Fask, ez eo gwelloc'h benniga an dour-badez evid peb badiziant.

Setu perag e kaver amañ, da genta, ar bedenn da venniga an dour (e nozvez ar Zul Fask end-eeun, ha goudeze a-hed ar bloaz, en diavêz d'an amzer Fask), d'an eil, ar bedenn war an dour a zo dija benniget (e-doug an amzer Fask dreist-oll).

- 7 - 171

I) DA VENNIGA AN DOUR-BADEZ (e nozvez ar Zul Fask
hag en-diaavêz d'an amzer Fask)

Pedom Doue...

Ho sakramanchou, Aotrou Doue, a zo evidom ar zinou a weler
euz an traou burzuduz a rit dre ho kalloud na weler ket.

A-hed istor ar zilvidigez, ho peus grêt, e meur a zoare, implij euz
an dour, bet krouet ganeoh, evid diskouez ennañ ar zin euz gras ar vadiziant.

Evelse, Aotrou Doue, kerkent hag er penn kenta euz ar bed,
edo ho Spered o plava 'uz d'an dour, evid sila ennañ nerz da rei santelez.

Evelse c'hoaz, dre an dour-beuz dirollet war ar bed, ho peus roet eur
zin euz ar vadiziant a ro d'an dud eur vuez nevez; rag an douriou braz a
ziskoueze war-eun-dro e oa echu gand ar pehejou ha diwanet ar vertuziou.

Ha da vugale Abraham, gand Moizez en o fenn, ho peus grêt treuzi ar
Mor Ruz eet da zeh, evid diskouez, er bobl diframmet euz sklavaj ar roue
Faraon, eur skeudenn euz ho pobl da zond, hini an dud vadezet.

Hag ho Mab karet, Aotrou Doue, a zo bet badezet gand Yann e dour ar
ster Yordan ha sakret gand ar Spered Santel. P'édo stag ouz ar groaz, e-neus
taolet dour gand ar gwad a rede euz e gostez digor. Hag erfin, goude ma oa
savet a varo da veo, e-neus lavaret d'e ziskibien: "It dre ar bed, digasit
an oll boblou d'ar feiz, ouz o badezi en ano an Tad, hag ar Mab, hag ar
Spered Santel."

Sellit bremañ gand karantez ouz hoh Iliz, ha lakit da darza enni an
dour euz mammenn ar Vadiziant.

Ra zeuio én dour-mañ gras or Zalver, ho Mab, dre ar Spered Santel,
evid ma hello an dén, ho peus bet krouet da denna deoh,
beza gwalhet, e sakramant ar Vadiziant, euz peb stlabez ar pehed
ha reseo, dre an dour hag ar Spered Santel, ar vuez nevez a raio anezañ
ho pugel.

⋈⋈⋈⋈⋈ Ar beleg a lak e zorn da douch ouz an dour, o lavared:

Ho pedi a reom, Aotrou Doue:
dre ho Mab, lakit da ziskenn er feunteuniad dour-mañ nerz ar Spered
santel, evid ma helle kement hini a vo, dre ar Vadiziant, sebeliet
er maro a-unan gand Or Zalver, adsevel da veo ivez a-unan gantañ.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. - R/. Amen.

2) PEDENN WAR AN DOUR PA 'Z EO BENNIGET DIJA (en amzer Fask)

Bennoz ha meuleudi deoh, Aotrou Doue, Tad oll-halloudeg,
ho peus krouet an dour evid nêtaad hag evid rei ar vuez:

R/. Meuleudi da Zoue! (pe eun diskan all.)

Bennoz ha meuleudi deoh, Salver Jezuz, Mab karet an Tad,
ho peus lezet dour ha gwad da redeg euz ho kostez, evid lakaad an Iliz
da veza ganet diwar ho maro hag hoh adsao da veo:

R/. Meuleudi da Zoue!

Bennoz ha meuleudi deoh, Spered Santel, on Doue ive,
ho peus sakret ha santelleet Or Zalver pa reseve ar vadiziant e dour
ar ster Yordan, evid ma vijem-ni oll badezet ennoh-c'hwi:

R/. Meuleudi da Zoue!

Aotrou Doue, emañ dirazoh (ar hrouadur-mañ) N..., galvet ganeoh
ha douget gand e dud da reseo ar Vadiziant e feiz an Iliz. Plijet
ganeoh eta, dre vertuz kuzet an dour santel-mañ, digeri dezañ an nor
d'ar vuez nevez a ro ar Spered Santel, evid ma vevo da viken.

R/. Amen.

±=±=±=± Doareou all da venniga an dour pe d'ober
ar bedenn war an dour bet benniget araog,
a vo kavet e dibenn al levrig, p. 24-25.

13. Kentel gand ar beleg:

Ouzoh e komzân bremañ adarre, tad ha mamm ar hrouadur-mañ, paeron ha maeronez ive.

Dre zakramant ar Vadiziant, ho krouadur a vo bremaig ganet d'ar vuez nevez a ziwano ennañ diwar an dour hag ar Spered Santel. Kement-se a vo grêt gand madelez Doue.

Med c'hwi, diouz ho tu, lakit ho poan d'e zevel er feiz kristen, evid ma vo ar vuez divin-se diwallet diouz kontamm ar pehed, ha kresket a zeiz da zeiz.

Neuze 'ta, ma'z oh douget gand ho feiz hoh-unan da respont evitañ, gand ar zoñj euz ho padiziant-c'hwi, ez an da houlenn diganeoh diskleria e fell deoh trei kein d'ar pehed ha lakaad ho feiz e Jezuz Krist, ar feiz a zo hini an Iliz, a vez badezet enni an òll vugale.

14. Evid "trei kein d'an droug", e heller dibaba etre an doare a/ pe b/

a/ Ha trei a rit kein d'ar pehed, evid beva dispeg euz e liammou, evel gwir vugale da Zoue? - R/. Ya!

Ha trei a rit kein da gement a zoug da ober an droug, evid mired na vefe ar pehed mestr warnoh? - R/. Ya!

Ha trei a rit kein da Zatan, tad ar pehed, evid heulia Jezuz Krist?
R/ Ya!

b/ Ha trei a rit kein da Zatan? - R/. Ya!

Ha trei a rit kein d'e oll oberou? - R/. Ya!

Ha trei a rit kein da oll douellou ar bed? - R/. Ya!

⋈⋈⋈⋈⋈ Dioustu goude, diskleriadur ar feiz,
er bajenn war-lerh.

15. Diskleriadur ar feiz, gand tri goulenn ha tri respont:

Ha kredi a rit e Doue an Tad oll-halloudeg,
krouer an neñv hag an douar? - R/. Ya, (kredi a ran.)

Ha kredi a rit e Jezuz Krist, e Vab unganet, on Aotrou,
a zo bet ganet euz ar Werhez Vari,
e-neus gouzañvet ar maro hag a zo bet laket er béz,
a zo savet a douez ar re varo
hag a zo azezet en tu deou d'an Tad? - R/. Ya.

Ha kredi a rit er Spered Santel, en Iliz santel katolik, e komunion
ar Zent, e pardon ar pehejou, en adsao ar re varo da veo,
hag er vez e peurbaduz? - R/. Ya.

Evid asanti gand an diskleriadur-se, ar beleg hag an dud all 'zo en iliz
a lavar asamblez:

Setu or feiz deom oll, setu feiz an Iliz,
a zo stad ennom ouz he diskleria, en Aotrou Krist, or Zalver.

(Pe, ma kaver gwelloc'h, eur han evel "Da feiz on tadou koz")

16. AR VADIZIANT - Ar beleg, ma vez ezomm, a ra sin d'ar gerent, d'ar paeron
ha d'ar vaeronez ive, da zond tre da gichen an dour-badez.
Ar hrouadur a vo douget kentoc'h gand e dad pe e vamm eged
gand ar paeron pe ar vaeronez.
Ar beleg a ra outo oll ar goulenn-mañ:

Ha felloud a ra deoc'h e vefe badezet N... e feiz an Iliz, ar feiz-se
emaom o paouez diskleria asamblez? - R/. Ya.

÷÷÷ Ha raktal e ro ar vadiziant d'ar hrouadur:

N..., DA VADEZI A RAN-ME

- + EN ANO AN TAD (Skuill a ra dour war e benn eur wech,
pe e zouba en dour.
- + HAG AR MAB (Skuill a ra dour eun eil gwech...
- + HAG AR SPERED SANTEL (Skuill a ra dour d'an deirved gwech.

17. Olevadur gand krisma santel - Ar beleg a lavar goudeze d'ar hrouadur:

An Doue oll-halloudeg, Tad Or Zalver Jezuz Krist,
e-neus bremañ tennet diwarnout pouez ar pehed
ha grêt dit beza ganet a-nevez euz an dour hag ar Spered Santel.
Pa 'z out digemeret e-touez e bobl santel, Eñ a verk ahanout
gand an oleo sakr, evid ma chomi da viken unanet gand an Aotrou Krist,
beleg, profed ha Roue.

R/. Amen.

÷÷÷ Lakaad a ra ar Hrisma santel war gern penn ar hrouadur.

18. Lid an dillad gwenn - (gwisket d'ar hrouadur gand ar vaeronez pe ar paeron)

Ar beleg: N..., setu grêt ahanout eur hrouadur ganet a-nevez,
hag an Aotrou Krist a zo da wiskamant;
kemer eta an dillad gwenn-mañ, evel merk euz da stad a gristen.
Sikouret gand da dud ha da vignoned, dre o homzou hag o skoueriou,
dalh direbech kaer da enor a gristen beteg ar vuez peurbaduz.

R/. Amen.

18b. Lid ar goulou: ar beleg a gemer en e zorn ar goulou-Pask war enaou (pe: elum)
hag unan bennag euz ar famill (an tad pe ar paeron, da skouer)
a enaou outañ eur goulou all. Ar beleg a lavar da genta:

N..., resevit sklerijenn an Aotrou Krist.

== ha goudeze e lavar d'ar famill:

Ennoh-c'hwi, tad ha mamm ar hrouadur, e baeron hag e vaeronez,
eo fiziet ar goulou-mañ, sin euz sklerijenn Or Zalver.
Beillit warnañ, ma talho ho krouadur, sklerijennet gand Jezuz Krist,
da gerzoud bepred er vuez evel eur mab a sklerijenn;
ma chom stard er feiz, e hello mond da ziambroug Or Zalver
pa zeuio en e rouantelez, a-unan gand oll Zent ar baradoz.

+++++

RANN DIWEZA

LIDOU DA GLOZA

19. Dirag an Aoter vraz.- Mond a reer neuze e prosesion beteg an aoter,
nemed, evel just, ma'z eo bet badezet er heur.
Goulaouenn an hini nevez-vadezet a zo war enaou,
douget gand an tad pe an tad-paeron. E kerz ar
brosesion, e kaner eur hantik d'ar vadiziant.

Kentel gand ar beleg (evelhénn, pe gand komzou heñvel:)

Va breudeur, ar hrouadur-mañ, ganet d'eur vuez nevez dre ar
vadiziant, a anver bremañ hag a zo e gwirionez bugel da Zoue.
Diwezatch, dre ar gonfirmasion, e resevo ar Spered Santel gand e oll
zonezonou. Pa zeuio d'an overenn, e kemero perz e sakrifis Or Zalver
hag e pred santel sakramant an Aoter; neuze, e kreiz an Iliz, famill
ar gristenien, e lavaro "Tad" d'an Aotrou Doue.

Bremañ, ez eo deom-ni komz evitañ, ni hag a zo dija bugale da
Zoue, gand e Spered o veva ennom. Lavarom eta ar bedenn a zo bet
desket deom gand Or Zalver:

== An oll neuze a lavar pe a gan ar Bater:

ON TAD hag a zo en neñv,
hoh ano bezet santelleet,
ho rouantelez deuet deom,
ho polontez bezet grêt
war an douar evel en neñv.

Roït deom hirio or bara pemdezieg;
pardonit deom or pehejou, evel ma par-
donom d'ar re o deus mañket ouzom,
ha n'on lezit ket da goueza en tentadur,
med on diwallit diouz an droug.

20. Da venniga ar vamm, gand he hrouadur war he divreh,
an tad ive, hag an dud a zo en-dro dezo:

+=+ Dibaba unan euz an tri stumm lakeet amañ da heul: A, B, C.

Stumm A. An Doue oll-halloudeg, dre e Vab ganet euz ar Werhez Vari,
a ro d'ar mammou kristen eul levenez seul vrasoh,
ma par dirazo, evid o bugale, an esperañs e vevint da virviken;
plijet gantañ skuill e vennoz war mamm ar hrouadur-mañ:
laouen bremañ o veza laket er bed he bugelig,
ra zalho bepred, hag eñ ganti, da drugarekaad Doue
dre Or Zalver Jezuz Krist.

R/. Amen.

An Doue oll-halloudeg, pa 'z eo eñ a ro ar vuez, hini ar bed-mañ hag
hini ar bed all, plijet gantañ benniga tad ar hrouadur-mañ:
dre e gomzou ha dre skoueriou e vuez, ra vo ar henta,
a-unan gand e bried, o sila ar feiz e spered hag e kalon ar hrouadur,
én Or Zalver Jezuz Krist.

R/. Amen.

An Doue oll-halloudeg, pa 'neus grêt deom, dre an dour hag ar Spered
Santel, beza ganet a-nevez evid ar vuez peurbaduz,
plijet gantañ skuill e vennoz war ar gristenien a zo amañ,
ma vint e peb leh hag e peb amzer izili beo euz e bobl,
én Or Zalver Jezuz Krist.

R/. Amen.

Doue oll-halloudeg d'ho penniga, +
an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Santel.

R/. Amen.

Stumm B. An Doue oll-halloudeg, gand ganedigez e Vab deut e-touez an dud,
e-neus karget ar bed a levenez;
plijet gantañ benniga ar hrouadur-man nevez-vadezet,
ma teuio, a-hed e vuez, da denna muñch-mui d'ar Zalver benniget.

R/. Amen.

An Doue oll-halloudeg, pa'z eo eñ a ro ar vuez, hini ar bed-mañ hag
hini ar bed all, plijet gantañ benniga tad ha mamm ar hrouadur-mañ:
laouen bremañ gand ar bugelig ganet en o zi,
ra zalhint bepred, hag eñ ganto, da drugarekaad Doue
dre Or Zalver Jezuz Krist.

R/. Amen.

An Doue oll-halloudeg, pa 'neus grêt deom, dre an dour hag ar
Spered Santel, beza ganet a-nevez evid ar vuez peurbaduz,
plijet gantañ skuill e vennoz war ar gristenien a zo amañ,
ma vint e peb leh hag e peb amzer izili beo euz e bobl,
én Or Zalver Jezuz Krist.

R/. Amen.

Doue oll-halloudeg d'ho penniga, +
an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Santel.- R/. Amen.

Stumm berr, C - Va breudeur, evidoh oll e houlennom gras ha madelez Doue,
an Tad oll-halloudeg, e Vab karet hag ar Spered Santel.
Bezit, 'hed ho puez, miret ha skoazellet gantañ,
ma vo sklerijennet ho hent gand ar feiz, ha ma'z eot erfin
beteg an eürusted prometet, ha ni ganech.
It bremañ e peoh Or Zalver. - R/. Bennoz da Zoue!

++ Evid kloza mad lidou ar Vadiziant, e tigouez kana eur hantik da druga-
rekaad Doue, da skouer an "Te Deum" pe ar "Magnificat".

++ Bez' ez eus ive, e kalz euz or parreziou, gizioù mad ha n'int merket
nag er Ritual latin, nag en hini galleg. Setu amañ diou anezo:

1) E parrezioù 'zo, ar hristen nevez a vez douget da bokad d'an aoter,
en eur douch an dirag euz an daol-aoter, ar pez a dalv da ziskouez ez eo an
hini badezet unanet gand an Aotrou Krist, hag ez eo galvet da zond en-dro
evid reseo sakramant an Aoter.

2) Dreist-oll emañ ar hiz da ouestla ar hrouadur d'ar Werhez Vari.

An tad hag ar vamm a hell pedi evelhénn:

"Gwerhez Vari, Mamm da Jezuz ha Mamm d'an oll gristenien, dond a reom
da ginnig deoh ar bugelig-mañ, a zo ganet deom dre vadelez Doue hag a zo
bremañ ganet a-nevez dre ar vadiziant. Gand ho kalon a vamm, beillit warnañ
penn-da-benn e vuez, evel m'ho peus bet beillet war ho Mabig Jezuz.

"Gouestla 'reom deoh e gorv hag e ene, e vloavezioù kenta, e yaouankiz
hag e oll amzer da zond. Roit dezañ yehed ha levenez, spered digor, bolontez
vad ha stard, kalon dener, ene divlamm. Grit dezañ kreski en oad hag e furnez,
dindan bennoz ha skoazell Doue an Tad e-neus e grouet, ar Mab e-neus e brenet,
ar Spered Santel a ra e zemeurañs ennañ.

"Or zikourit-ni da rei dezañ eur gelennadurez vad ha d'e heñcha warzu
ar stad a vuez merket dezañ gand Doue; ha goulennit evidom ar hras da veza,
eun deiz, gantañ en ho kichen, e ti on Tad euz an neñv. - Amen.

An oll: Me ho salud, Mari, leun a hras, an Aotrou Doue 'zo ganeoh; benniget oh
dreist an oll gwragez, ha benniget eo ar frouez euz ho korv, Jezuz.

Santez Mari, Mamm da Zoue, pedit evidom, peherien,
bremañ ha d'an eur euz or maro. Amen.

+++++

SKRITUR ZAKR evid ar VADIZIANT

÷÷ Da genta e vo kavet ar pennadou Aviel
lakeet er renk kenta er Ritual latin;
da houde, re all hag a zo erbedet ive.

1) PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (3/1-6)

Etouez ar Farizianed, e oa eun dén anvet Nikodem, unan euz pennou braz ar Juzevien. Dond a ra da gaoud Jezuz diouz an noz, hag e lavar dezañ: "Mestr, gouzoud a reom ez eo a-berz Doue oh deut da gelenn an dud, rag dén ebed n'hell ober ar burzudou a rit, ma n'emañ ket Doue gantañ."

Jezuz a respont dezañ: "E gwirionez, m'hén lavar dit, dén ebed, ma ne vez ket ganet a-nevez, ne hell gweled rouantelez Doue." Ha Nikodem da lavared: "Med penaoz e hell eun dén beza ganet pa'z eo deut koz? Daoust hag e hell mond en-dro e kov e vamm evid beza ganet a-nevez?"

Setu respont Jezuz: "E gwirionez, m'hén lavar dit, dén ebed, ma ne vez ket ganet a-nevez euz an dour hag ar Spered Santel, ne hell mond e rouantelez Doue. Kement a zo bet ganet diwar an natur-dén, n'eo nemed natur-dén, ha kement a zo bet ganet euz ar Spered, a zo spered."

2) PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE (28/18-20)

Araog pignad d'an neñv, goude ma oa savet a varo da veo, Jezuz e-neus lavaret d'an Ebestel:

"Roet eo bet din peb galloud en neñv ha war an douar.

It en hent eta, digasit an oll boblou da veza diskibien din;

c'hwí o badezo en ano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Santel,

hag a zesko dezo heulia kement tra am eus gourhemennet deoh.

Ha setu emañ ganeoh bemdez beteg fin ar bed."

3) PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (1/9-11)

- Badiziant Or Zalver -

En amzer-se, e oa deut Jezuz euz Nazared Bro-Halilea,
 hag e oa bet badezet gand Yann er ster Jordan.
 Kerkent ha m'eo savet euz an dour, e wel an neñv o tigeri
 hag ar Spered Santel, evel eur goulm, o tiskenn warnañ;
 hag eur vouez a glever o tond euz an neñv:
 "C'hwil eo va Mab karet, ennoh e kavan va dudi."

4) PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (10/13-16)

- Jezuz hag ar vugaligou -

An dud a zigase bugaligou da Jezuz, evid ma touchfe outo,
 med an diskibien o skandale.
 O weled an dra-ze, Jezuz, droug ennañ, a lavar dezo:
 "Lezit ar vugaligou da zond d'am haoud, na glaskit ket mired outo,
 rag d'ar re a denn dezo eo rouantelez Doue.
 E gwirionez, m'hén lavar dech:
 an neb na zigemer ket rouantelez Doue evel ma ra eur hrouadur,
 n'hello ket mond e-barz."
 O hemer a ree etre e zivreh,
 hag o benniga en eur lakaad e zaouarn warno.

5) PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (15/1-11)

- Ar winienn wirion -

Araog tremen euz ar bed-mañ daved e Dad,
 Jezuz a lavare d'e ziskibien:
 "Me eo ar winienn wirion, ar gwiniennour eo va Zad.

Kement skourr ennon na zougo ket a frouez a vo trohet kuit gantañ,
ha kement hini a zougo frouez a vo gantañ nêteet ha krennet,
evid ma tougo muioh.

C'hwi, adal bremañ, a zo nêt, ablamour d'ar homzou am eus lavaret deoh.
Chomit ennon, ha me ennoh.

Ne hell ket eur skourr dougen frouez dre e nerz e-unan;
evelse, na c'hwi kennebeud, ma ne jomit ket stag ouzin.
Me eo ar winienn, c'hwi ar skourrou.

An hini a jom ennon, ha me ennañ, hennez a zoug kalz frouez,
rag, distag diouzin, n'hellit ober netra.

An neb na jom ket stag ouzin a vo stlapet kuit,
evel ma reer d'eur skourr, hag a zeho,
a vo dastumet, taolet en tan ha devet.

Ma chomit stag ouzin ha ma chom va homzou ennoh,
goulennit ar pezh ho po c'hoant, hag e vo roet deoh.
Kement-mañ eo a zavo gloar d'am Zad: ma tougit frouez e-leiz
ha ma vezit diskibien din.

Evel ma 'neus va Zad karet ahanon, me ivez am eus ho karet.
Chomit em harantez.

Gand ma heuliot va gourhemennou, e chomot em harantez,
evel ma heulian-me gourhemennou va Zad
hag e choman en e garantez.

Kement-se am eus lavaret deoh,
evid ma vo va levenez ennoh
ha ma va peur-leun ho levenez.

++++++

6) PENNAD EUZ LEVR AR PROFED EZEKIEL (36/24-28) - Buez nevez dre an dour
hag ar Spered.

Evelhénn e komz an Aotrou Doue:

Mond a rin da gemer ahanoñ a-douez an oll boblou,
ha d'ho tastum euz an oll vroioù, evid ho tigas en-dro d'ho pro.
Skuill a rin warnoñ dour nê, d'ho nêtaad euz kement loustoni 'zo ennoñ;
euz stlabez hoh oll idolou e walhin ahanoñ.

Hag e roin deoñ eur galon nevez,
eur spered nevez a lakin en ho kreiz;
tenna 'rin diganeoñ ho kalon kaledet evel eur mên,
hag e roin deoñ eur galon veo.

Va spered-me a lakin ennoñ, hag e rin deoñ heulia va lezennoù
ha mired va gourhemennnoù en ho puez.

C'hwi a vevo er vro am eus bet roet d'ho tadou.

C'hwi 'vo va fobl, ha me 'vo ho Toue.

7) PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN ROM (8/28-32)

Va breudeur, evid an dud a gar Doue, peb tra a dro evid o mad,
o veza m'int bet galvet hervez e venoz a garantez.

O anavezet e-neus a oll viskoaz, hag o dibabet
da veza lakeet heñvel ouz e Vab,
evid ma vo hemañ ar henta ganet euz kalz a vreudeur.

Ar re e-neus dibabet, e-neus ive galvet;
ar re e-neus galvet, e-neus lakeet dibeh;
hag ar re e-neus lakeet dibeh, e-neus roet dezo e hloar.

Petra da lavared ouspenn? Ma 'mañ Doue evidom, piou 'vo a-eneb deom?
Eñ n'e-neus ket damantet d'e Vab,

med e roet e-neus evidom oll:

penaoz, war-eun-dro gantañ, ne rofe ket deom peb tra?

8) PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN ROM (6/3-5)

- Ar Vadiziant a rô perz deom e maro Jezuz
hag en e vuez nevez.-

Va breudeur, her gouzoud a rit, ni oll, badezet en Aotrou Krist,
en e varo eo om bet badezet.
Dre ar vadiziant en e varo, om bet laket er béz gantañ,
evid dond da veva, ni ivez, eur vuez nevez,
evel ma'z eo ar Zalver, dre halloud an Tad, savet a-douez ar re varo.
Rag, ma 'z om bet unanet gantañ en eur heulia anezañ er maro,
e heulia a raim ivez oh adsevel a varo da veo.

9) PENNAD EUZ LIZER KENTA AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KORINT

(12/12-13) - Eur horv, eur spered.-

Va breudeur, komprenit an traou diwar ar skouer-mañ:
ar horv n'eus nemed unan anezañ, ha koulskoude e-neus izili niveruz;
hag oll izili ar horv, n'eus forz ped a zo anezo, a ra
eur horv hebkén.
Evelse ivez an Aotrou Krist.
Rag, er Spered n'eus nemetañ, om bet badezet da veza eur horv hebkén,
ni oll, euz kement gouenn ha kement stad ma'z om,
koulz Juzevien ha poblou all, koulz mistri ha servicherien;
hag oll on eus bet da eva diwar ar Spered n'eus nemetañ.

10) PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN BRO-HALL AZIA

(3/26-28)

Va breudeur, c'hwi 'zo oll, e Jezuz Krist, bugale da Zoue.
Rag c'hwi oll, pa'z oh bet badezet da veza unanet gand an Aotrou Krist,
ho peus gwisket an Aotrou Krist. Setu n'eus mui ano euz Juzeo ha payan,
euz servicher ha mestr, euz gwaz ha maouez,
pegwir n'oh nemed unan, c'hwi oll, en Aotrou Krist.

SALM 22 - "Doue eo va fastor" (Ton e levrig "Breiz a gan" n^o 3, embannet
gand an ao. R. Abjean, Montroulez).

Diskan: Doue eo va fastor, ne vanko din netra,
Rag war ar peuri druz am has da ziskuiza.

1. War lez an douriou sioul, e torr naon va ene;
Va has a ra d'e heul, war hent ar garante.
2. Hag e rankjen treuzi traonienn zu ar maro,
Aon ebed n'am bije: ganin e vo ato.
4. C'hwi 'zavo evidon eun daol warni peb tra;
C'hwi daolo war va fenn eol fronduz an dousa.
5. Gras kaer an eürusted a leunio va bué,
Da hortoz mond eun deiz beteg ti va Doue.

An destenn n'eo ket
troidigez rik, med
tost-tre d'an hini
hebreeg evelato.

+++++

SALM 33 - (Da ziskan e heller kemer unan euz "Breiz a gan" n^o 3, p.28 pe 29).

1. Bennoz a lavararin da Zoue e peb amzer, e veuleudi heb ehan em génou.
Gand Doue 'vin laouen ha stad ennon; ra glevo an dud vad, ha joa dezo!
2. An dén a dro e zell ouz Doue a vo er sklerijenn, heb aon na méz.
Pa zav ar paour e vouez, Doue a glev hag e denn a boan.
3. Emañ El Doue o veilla, prest da zikour an dud fidel.
Grit an tañva, da weled pebez dudi a gaver gand Doue.

+++++

DA FEIZ ON TADOU KOZ, ni pôted Breiz-Izel, ni 'zalho mad ato;
'Vid feiz on tadou koz hag en-dro d'he baniel, ni oll en em stardo:
Feiz karet on tadou, morse ni ho naho! Kentoh ni a varvo! (3 gwech)

+++++

PEDENN AR GRISTENIEN gand komzou all. (euz ar bajenn 4)

II

Ar beleg: Va breudeur k  r, pa 'z om bet galvet gand Doue da veza e bobl, pedom an Tad leun a vadelez evid ar hrouadur a vo badezet bre-maig, evid e dad hag e vamm, e baeron hag e vaeronez, hag evid an oll dud a vev hirio war an douar.

Diskan: Aotrou Doue madelezuz, selaouit or pedenn.

Al Lenner: Evid ma plijo gand Doue digemer ar hrouadur-ma  n en e Iliz dre zakramant ar Vadiziant, pedom a greiz kalon...

2. Evid ma chomo 'hed e vuez fidel d'Or Zalver Jezuz Krist, on eus merket sin e groaz warna  n, pedom a greiz kalon...
3. Evid ma heulio Jezuz Krist, o vervel d'ar pehed, ha ma '-no perz ive en e adsao a varo da veo, pedom a greiz kalon...
4. Evid ma kavo en e di, da heul karantez e dud, kenteliou ha skoueriou mad evid e he  ncha er vuez, pedom...
5. Evid an oll gristenien a zo ama  n, ma vleunio enno a-nevez gras o badiziant, pedom a greiz kalon...
6. Evid oll gristenien ar bed, diskibien da Jezuz, ma vevint bepred unanet dre ar feiz hag ar garantez, pedom...

Santez Mari, Mamm da Zoue, R/. Pedit evidom.

Sant Jozef, tad mager da Jezuz, R/. id. - Sant Yann Vadezour...

Sant Per ha sant Paol... - (Patron (-ez) ar bugel)...

Oll Zent ha Sentezed Doue...

III An ali da bedi gand ar beleg, evel d'an n^o II.....

1. Evid ar hrouadur-mañ, ma plijo gand Doue e gemer etouez e vugale, pedom...
2. Evid ma vo bepred, par d'ar skourr stag ouz ar winienn, unanet gand
Or Zalver dre ar feiz ha buez ar hras, pedom...
3. Evid ma chomo bepred e karantez Or Zalver ha ma vo gouest da rei dirag an
dud eun testeni mad evid ar feiz kristen, pedom...
4. Evid ma hello, gand gras Doue, mond beteg an eürusted peurbaduz, pedom...
5. Evid e dad hag e vamm, e baeron hag e vaeronez, ma ouezint digeri e spered
hag e galon da anaoud ha da gared Doue, pedom...
6. Evid m'o devo an oll dud ar hras da zond d'ar feiz ha da veza ganet a-nevez
dre ar vadiziant, pedom...

==+ Da houde, litani ar Zent.

IV

1. Evid ar hrouadur-mañ, ma plijo gand Doue, dre ar vadiziant, e zigemer
etouez e vugale ha dond da veva ennañ, pedom...
2. Evid ma vo bepred, eur wech ganet euz an dour hag euz ar Spered Santel,
renet gand Spered Doue, ha ma vo gouest da rei dirag an dud
an testeni euz buez nevez eur hristen, pedom...
3. Evid ma vo gouest d'en em ziwall a-eneb an droug-spered, ha da dehoud
diouz kement tra a zoug d'ar pehed, pedom...
4. Evid ma lako oll nerz e galon hag e spered da gared Doue, ha ma karo
e nesa eveldañ e-unan, pedom...
5. Evidom-ni oll a zo amañ, ma kavio ar hrouadur-mañ ganeom an resteni eur
or feiz hag or buez kristen, pedom...
6. Evid an oll gristenien, dezo da gaoud soñj o deus bet, en o badiziant, ar
merk euz kroaz Or Zalver, ha da jom fidel dezañ, pedom...

+++++

PEDENNOU ALL WAR AN DOUR-BADEZ (euz ar bajenn 8)

D'E VENNIGA pe DA DRUGAREKAAD DOUE

3) DA VENNIGA AN DOUR - (evel p. 8, gand ar goulennou evid benniga.)

Bennoz ha meuleudi deoh, Aotrou Doue, Tad oll-halloudeg, ho peus krouet an dour evid nêtaad hag evid rei ar vuez:

R/. Meuleudi da Zoue! (pe eun diskan all)

Bennoz ha meuleudi deoh, Salver Jezuz, Mab karet an Tad, ho peus lezet dour ha gwad da redez euz ho kostez, evid lakaad an Iliz da veza ganet diwar ho maro hag hoh adsao da veo: - R/ Meuleudi da Zoue!

Bennoz ha meuleudi deoh, Spered Santel, on Doue ive, ho peus sakret ha santelleet Or Zalver pa reseve ar vadiziant e dour ar ster Yordan, evid ma vijem-ni oll badezet ennoh-c'hwi: - R/ Meuleudi da Zoue!

Deuit, Aotrou Doue, on Tad, da zantellaad an dour-mañ, bet krouet ganeoh; grit ma vo gwalhet euz o fehejou ar re a vo badezet ennañ, ha ma resevint ar vuez nevez a ray anezo ho pugale.

R/. Aotrou Doue madelezuz, selaouit or pedenn.

Kargit a zantelez an dour-mañ: grit d'an dud a vo badezet ennañ kaoud perz e maro Or Zalver hag en e adsao da veo, ha dond da veza poltrejou beo ho Mab. - R/. Aotrou Doue madelezuz, selaouit or pedenn.

(Ar beleg a douch an dour gand e zorn:)

Kargit a zantelez an dour-mañ krouet ganeoh, evid m'o devo buez nevez dre ar Spered Santel an dud dibabet ganeoh da veza ho pugale, ha ma kavint o flas e-touez ho pobl santel. - R/. Aotrou.....

Aotrou Doue, emañ dirazoh (ar hrouadur-mañ) N..., galvet ganeoh ha douget gand e dud da reseo ar vadiziant e feiz an Iliz. Plijet ganeoh eta, dre vertuz kuzet an dour santel-mañ, digeri dezañ an nor d'ar vuez nevez a ro ar Spered Santel, evid ma vevo da viken. - R/. Amen.

4) DA VENNIGA AN DOUR, pe, ma'z eo benniget, DA DRUGAREKAAD DOUE.

Aotrou Doue, Tad madelezuz, bennoz ha meuleudi deoh, evid beza, da zeiz or badiziant, laket da darza ennom buez nevez ho pugale.

R/ Meuleudi da Zoue! (pe eun diskan all)

Bennoz ha meuleudi deoh, rag, dre vertuz an dour hag ar Spered Santel, c'hwi a zastum en eur bobl hebkén an oll dud badezet e Jezuz Krist.

R/ Meuleudi da Zoue!

Bennoz ha meuleudi deoh, rag, dre ar Spered a zo hini ho karantez, skuillet en or halonou, c'hwi on laka dishual hag a dorr on liammou, evid ma hellim tañva douster ho peoh. - R/ Meuleudi da Zoue!

Bennoz ha meuleudi deoh, c'hwi hag a zibab ho pugale badezet evid mond laouen dre ar bed a-bez da skigna kelou mad ar zilvidigez.

R/ Meuleudi da Zoue!

Aotrou Doue, emañ dirazoh (ar hrouadur-mañ) N..., galvet ganeoh ha douget gand e dud da reseo ar vadiziant e feiz an Iliz.

: Ma n'eo ket : Plijet ganeoh eta benniga + an dour-mañ hag e zantellaad,
: benniget : ma resevo ennañ ar vuez nevez, ha ma vevo da viken.
: an dour :
R/ Amen.

: Ma'z eo dija : Plijet ganeoh eta, dre vertuz kuzet an dour santel-mañ, digeri
: benniget : dezañ an nor d'ar vuez nevez a ro ar Spered Santel,
evid ma vevo da viken.
R/ Amen.

+++++

T A O L E N N

<u>RANN Ia.</u> - Lidou an digemer	2-3
<u>RANN II.</u> - Lid ar Skritur Zakr	3
(ar pennadou da zibaba, p. 16-21)	
gand Pedenn ar gristenien	4-5
(doareou all, p. 22-23)	
<u>RANN III.</u> - Lid ar zakramant	6
Pedenn-venniga an dour-badez	7-8
(doareou all, p. 24-25)	
Trei kein d'an droug ha diskleria ar feiz	9-10
Ar Vadiziant	11
Krisma santel, an dillad gwenn, ar goulou	11
<u>RANN DIWEZA.</u> - Lidou da gloza	12
Ar Bater - Ar vennoz war an dud	13-14
Da ouestla ar hrouadur d'ar Werhez	15

=====

<u>STAGADENN</u> - Pennadou Skritur Zakr	16-21
Pedenn ar gristenien	22-23
Benniga an dour-badez	24-25

+++++

